




BUE

an

Den Euruz Charlez Bleiz

DUK A VREIZ


Gant DIR-NA-DOR



SANT-BRIEG


Ti-Mouleruz Sant-Gwilherm, 27, Bali Charner

1910




Bue an Den Euris

Charlez Bleiz



58200




BUE

an

Den Euruz Charlez Bleiz

DUK A VREIZ

Gant DIR-NA-DOR



13
344-
104
LE7



Église catholique
en Finistère


Document numérisé en 2021

SANT-BRIEG

Ti-Moulerrez Sant-Gwilherm, 27, Bali Charner

1910





KENTAN PENNAD

E yaouankiz hag e zimezi

Santelez Charlez. — E virakl kentan. — Dimezet dre zorn e eontr. — Kont a Wengamp eo, ha duk a Vreiz.... marteze.

Charlez Bleiz a oe ganet er bla 1320 en kêr Bleiz, (e galleg, Blois). Mab a oa da Gui a Chatillon, kont a Vleiz hag a Dunois. Tiegez Châtillon a oa eus ar re uhelan : meur a zimezi a oa bet gret etrezi ha tiegez rouane Frans. Charlez, zoken, a oa a wad reial, e vam, Marc'harit a Valois, o vean c'hoar d'ar roue Fulup VI.

Eur breur an evoa kosoc'h evitan, Loeiz, hag eur c'hoar yaouankoc'h, Mari. Loeiz, Charlez ha Mari a oa tri vugel hag a lake lorc'h ha levenez en kalon o c'herent ; mes Charlez a oa dreist d'an daou-all.

Adalek e vugaleaj; e spered a glasse Doue hag a 'n em blije 'barz ar zonj anean.

Eun dimezel eus an noblans, Jilet la Barre, a oe karget d'ober eus ar vugale ha da rei d'e ar gelen-nadurez kentan.

Ar plac'h-man, doujanz Doue en he c'halon, a 'n em gavas evurus o kentelien eur bugel ken techet mat ha Charlig: eur vam na vije ket bet muioc'h eveziek eviti. Deski a reas d'ean, dre envor, eleiz a bedennou kaer, ha darn eus gwirioneou ar relijion, herve e oad. Kement e plije d'ean ar pedennou, ken, dal ma ouias lenn, en em lakas da zeski reo-all en e levr-oferen.

Pa oe ét war e seiz vla, e oe laket etre daouarn eur mestr-skol, Yan Largentier, hag eur beleg, Jakez Huchin, eun den rik, mes eun den garo, hag a gastize koulz ar mestr-skol 'vel ar skolaer, pa ne vije ket labourer mat awalc'h, herve e zonj. 'Vit bean skoet e-unan, Charlig na lavare netra; mes pa wele skei war e vestr-skol, e teue da c'houlenn pardon digantan: « Warnon, emean, e tleje bean koueet an tól, rak me zo bepred o chachan ar bec'h warnoc'h ! »

Koulskoude, ar pôtrig na souze ket 'rôk al labour. Kement a spered 'vel an evoa, ha kement 'vel a labourer, ec'h eas, en berr amzer, arôk e vreur hag e c'hoar. E dad, o welet kement-se, a lavare awechou: « Charlig a zo redroet gant ar studi; red vo d'in tennan e levriou digantan. »

E vreur hag e c'hoar a lavare, eus o zu, e oa redroet gant an devosion, ha ne vije biken mat nemet d'ober eun ermit. Bep beure, ec'h eent o zri da chapel ar c'hastel, 'vit klevet an oferen. Dal ma vije achu, Loeiz a c'halve e vreur: « Dont a rez ? emean. » — « Nan, eme Charlez, abred awalc'h e

renkin kwitât; gant Doue ne chomer gwech ebet re bell. »

Souezet e ver o welet nag a zevosionou an evoa en eun oad ken tener. Bemde, e lavare ter *Bater* ha tri *Ave* en enor d'an Drinded; pemp, en enor da c'houliau Hon Zalve; seiz, evit miret da gouean er pec'hejou kapital; trizek, en enor d'an Ebistel, hep kontan kalz a bedennou-all. Arôk e brejou ha 'rôk mont da gousket, e lenne Aviel Sant Yan, *In principio*; da oueliou ar Werc'hez, e lavare hec'h ofis bras war e hed; bep lun, bep merc'her ha bep gwener, ofis bras an Anaon; 'pad ar c'hoareiz, e lenne pep sun levr ar psalmou penda-ben. Yun a re derc'hent ar goueliou bras, hag ive pep sadorn, ha c'hoaz an ije gret pinijennou-all, panevert ar medisin a zifennas outan. Evitan da vean ken yaouank, ne glasse na c'hoariet na godiserez. Man nemet e zoare fur ha pouellek a drec'he ar gomz d'ar re a felle d'e trei anean war an ebad.

'N evoa ebad ebet nemet unan: digemer ar beorien ha rei d'e aluzen. Bemde e vije merniet en zal vras ar c'hastel kement paour a zigouee. Charlez a yee d'arbenni hent d'e, a zigore d'e an nor, a re digas boed, hag o zervije hen e-unan ouz tól. Goude pred, e karge d'e o godellou a vara, ha, pa o dije ezom a arc'hant, e roe d'e kement a vije en e yalc'h. Pa vije skarz, ec'h ee da gestal. Gwech e c'houlenne en prest digant ar mevelien pe digant an dudjentil a oa el lez; gwech-all ec'h ee da gât ar c'hefier.

— Petra rez gant kement-all a arc'hant ? a c'houlennas e dad digantan, eun de.

— Sikour ar beorien, ma zad, emean.

Ar c'hont a roas urz, adalek an de-ze, da rei d'ean ar pezh a c'houlennje.

Gwelet e ve awechou, etouez an-dud a beadra, krënnarded ha tud yaouank ha n'ouzont penôs ober evit kê digareou da zispign o arc'hant. Charlez ive a vije dalc'hmad war evez evit kê eun digare bennak da zispign e re, n'e ket, avat, en c'hoariou nag en plijadurioù. Pan e da vale war ar mêz, e leze an dudjentil-all da vont war o zu, hag ee'h ee e-unan-penn d'ober eun dro dre an henchou hag an tier, da glask ar beorien, evit rannan etreze an arc'hant a vije gantan.

Evelse, e kreiz ar binvidigez vras a oa endro d'ean, e veve paour a galon, ken paour hag an disteran eus ar beorien. Bean 'n evoa treo pezh a gare, mes n'e ket evitan e oant.

Daou dra a zo hag a blij meurber da galon eur pôtr yaouank : arc'hant en e c'hodel, dilhad kaer war e gein. Charlez na zalc'he ket muioc'h d'an dilhad kaer evit ne zalc'he d'an arc'hant.

E c'hoar o vean dimezet d'an duk a Lorën, e vreur-kaer a gasas d'ean eur gwiskamant zaei broudet gant aour ha mein talvoudus. Ar prins yaouank na gavas ennan nemet eur si : re gaer a oa. Ar yaouankizou-all a 'n em stipas hag a 'n em fichas pep hini moustran m'hallañ ; Charlez a yeas d'an eured gant eur gwiskamant dereat, kempen, mes e zilhad zaei hag aour a lezas er gêr.

Neb a wele anean da bemzek vla a renke studian piz 'vit kê ennan si fall ebet : desket e oa, ar pezh a halle bean eur prins en e amzer ; goût a re mont war vare'h ha c'hoari an armou koulz ha dijentil abet eus e oad ; hag evit pezh a zell ar furnez, e oa dispar. Eus e furnez e oa dleour, da gentan, da Zoue, goude, d'e gerent ha d'e vistri, mes ive d'e amzer. Evurus, a lavarar, an neb a zo ganet en eur vro vat ; evurus ive an neb a zo ganet en eun

amzer vat. Er mare ma veve Charlez Bleiz, ar bed na oa ket, evel breman, leun a skouerioù hudur hag a vennoziou diboele ; dreist d'ar broioù ha d'ar gouarnamanchou, ar relijion a oa rouanez.

Rouantelez Frans a-bez a oa henvel ouz eun tiegez kristen elec'h ma chom bepred ar relijion divrall 'us d'ar pennoù, daoust d'ar gwall avel da c'houean awechou. Amzer evurus, pan halle ar furnez hag ar wirione bale en pep lec'h, soun o fenn, hep aon da 'n em gailhari ! Dre ze, Charlez a gavas ane war e hent, hag a reas gante anaoudegez da vat.

Kentan ma tigoueas d'an dud gouzout pegeit e oa arru, war hent ar zantelez, a oe dre eur burzud a reas Doue drezan. Eun abardevez hanv, ar c'hont a Vleiz hag e vugale, eur bagad itronezed ha tud-jentil war o zro, a oa o tizrei eus kastel Montfrant da gastel Monrion. Eur paour kez dall o klask e vara a glevas e oant o tremen, hag a chomas war ribl an hent d'o gortoz. Charlez, herve e gustumans, a droas a-goste 'vit komz gantan ha rei d'ean e brof.

Mes an de-se, marvad, a oa bet 'n em gavet stank ar beorien war e hent, rak, pa glaskas e yalc'h, ne oa ken netra enni. Hag hen o tennan unan eus e vanegou.

— « Dalet, emean, d'ar paour kez, roet ar vane-gen-man da gefier ma zad, hag ho po aluzen digantan. » An dall a hastas ober 'vel oa lavaret d'ean gant ar prins. Pan evoe bet e dammig gopr, ec'h eas da glask anean 'vit hen trugarekât. Ha setu o tont eur zonz 'n e benn : « Mar lakfen ar vane-gen-man, emean, war ma daoulagad ! » Kerkent hag hen o stokan anei ouz e dal, ha kerkent ar gweled o tont d'ean. N'eus ket ezom da lavaret mar oa evurus.

Mont a reas, en eur redaden, betek kastel Monrion, hag e kontas dirak an holl ar pezh a oa c'hoarvezet gantan.

Tostat a re evit ar prins yaouank an heur da zibab eur stad a vue. Herve kreden an holl, n'hallé biken bean nemet beleg pe manac'h. Bet e oa, en pep amzer, kalz a dud a ilizetouez e gerent : Charlez a heuilhje o roudou, hag a vije marteze eskob, evel ma oa bet meur a hini ane hag a gonter o deus bet renet ilizou, 'vel Beauvais, Soissons, Laon, Noyon, Reims, Langres. Evelse e oa sonj kement hini, koulz lavaret, a anavee hag a daremprede anean. Mes Doue 'n eus ive e zonz war bep hini ac'hanomp. D'an oad a seitek vla, petra c'hoarvezas gant Charlez ? E oe galvet gant e eontr, roue Frans, da zimezi d'eur brinsez vreton a oajou gantan, Jann a Vreiz, kontez Penteur.

Bean oa houman eus an tiegez an uhelan, krouet er bla 1035, gant eur breur d'an duk Javré, Eudon. E tro 'pad tost da 200 vla, he devoa bet dindan he domani Penteur, Treger ha Goelo. Er bla 1214, e kollas Treger, ha Herri Penteur, kont en amzer-ze, a gemeras an hano a Avelgor. Diouz hennec e tiskenne war eun ar brinsez Jann.

A dra zur, an dimezi, forz pe tu e seller, a oa kaer hag enorus. Daoust ne oa nemet nizez d'an duk a Vreiz, Jann a oa galvet da vean dukezh war e lerc'h ; setu dre benôs. Yan III, hec'h eontr, n'evoa ket a vugale, evitan da vean bet dimezet ter gwech. N'evoa ken, diouz eun tu, nemet eul lez-vam, hanter-c'hoarezed hag eun hanter-vreur, Yan a Vontfort ; diouz an tu-all, tostan karr an evoa a oa ar gontez Jann, merc'h e eil vreur. Houman a blije d'ean ; e lez-vam, avat, hag he bugale, ne oa ket 'vit gouzanv ane. Ar vrud a zavas koulskoude,

dre ar vro, penôs, pa vije maro Yan III, ec'h aje e gurunen gant e hanter-vreur. Ar vrud-ze a lakas kement a droug en duk, ma klaskas, etre diou wech, sinan dukaj Breiz da roue Frans ; ar pezh an ije gret, panevert d'ar Vretoned. Koulskoude, eur prins-all a oa war renk : Charl, mab roue Navar, hag a dlee eureuji d'ar brinsez Jann. Mes ne oa c'hoaz nemet eur bugel, pa oa houman en oad da zimezi. Setu e teuas neuze sonj d'ar roue Fulup VI eus mab e c'hoar, oajet a seitek vla, eur bla pe daou kosoc'h evit ar brinsez. Eur prins seurt ma oa, fur, wesk, gouziek ha kalonek, Charlez a oa ennan danve eun duk a Vreiz, hag eun duk hag a dougje interest d'ar Frans ha d'he roue.

Fulup VI a gomzas eta gant Yan III ha gant an dudjentil breton. 'N em glevet a reas ive gant roue Navar 'vit ober dic'haoui 'nean, pa golle e vab kurunen Breiz, hag an treo o vean 'n em gavet par, e oe eureujet Jann Penteur ha Charlez Bleiz, evit bean divezatoc'h, herve zonz ar roue, da vihanan, duk ha dukezh a Vreiz. Divizet e oe, gant an dimezi, e tougje Charlez, evit armou, hano hag ardamezh Breiz-Izel.

*
* *

Kalz a dudjentil hag a eskibien a ginnigas, ane o unan, o gwasoniezh da Charlez ha d'e bried ; mes kalz-all o devoa roet dija o mouez d'ar c'hont a Vontfort, hag al loden vrasan eus ar bobl a oa gante.

Pa deuas gant e bried da Wengamp, da welet e zujidi, Charlez a oa nec'het o sonjal en dra-ze.

Daoust pegement a harp an evo eus abeurz an duk Yan hag abeurz e eontr, bepred e sant ankeniet e galon o sonjal en amzer da zont.

Ne chomas ket pell en Gwengamp, peadra 'vit zevel eun oter d'eur prins yaouank eus e gerent, S. Loeiz a Varseilh, maro kapusun hag eskob, da dri bla warnugent, ha gret sant, ugent vla oa. An oter-ze, savet en iliz kapusuned Gwengamp, a oa 'vel eur zin e westle hiziviken ar prins e holl garante d'ar Vretoned, p'eo gwir e fizie warne da viret ha da enori eur zant eus e wad.

Er bla 1338 hag er bla 1340, ec'h eas da vro Flandrez, da vrezelli asambles gant an duk a oa bet galvet da rei skoazel da roue Frans.

Eno e lakas Doue war e henteur eontr d'e bried, Herve a Leon. eun den santel, douget d'ar beden ha d'ar binijen, hag a stagas e galon hag e vue ouz hini Charlez, adalek an amzer-ze.

Evit donezon a garante, e kinnigas d'e niz eur gouriz reun marc'h hag eur gorden leun a skoulmou, da zougen dindan e zilhad, evit enori Doue ha kastizan e gorf.

Pa dol an nen e zaoulagad war an eil loden eus bue Charlez, a zo o vont da zigeri, ne ver ket 'vit harz da zonjal e oa ar gorden hag ar gouriz-ze abeurs Doue, 'vel 'vit rei da zantout d'ar prins pe-sort planeden a vije e hini.

*
*
*

Ar bla 1341, an duk Yan III a oa o tizrei eus ar Flandrez, goude ma oa bet sinet ar peuc'h gant ar Zaozon, pa oe skoet gant ar c'hlenved, en eur arruout en Caen. E ankou an evoa kavet eno. Souden e tec'has ar vrud dre bevar c'horn Breiz-Izel, eus a Zant-Malo da Naoned, hag eus a Roaon da Vrest, e oa maro Yan III, duk ar Vretoned. Na Yan a Vontfort, na Charles Breiz na oant war

e dremenvan. Den na ouias eta, da vat, pesort bolante a oa hini an duk, petra e felle d'ean da lavaret dre e gomzou diwean : « *En han' Doue, ma lezet en peuc'h ; n'houllan ket samman ma ine.* »

Herve Yan a Vontfort, an duk an evoa c'hoant da lavaret dre ze : « [N'houllan ket samman ma ine, o c'hervel Charlez Bleiz da vean duk war ma lerc'h ; » herve Charlez Bleiz hag e vignoned, e oa, er c'hontrol, komzou Yan III eur respont d'ar re a glaske ober d'ean hanvan e hanter-vreur duk en e c'houde.

Evit troc'han krenn ar prosez, ne oa ken nemet mont dirak lezvarn roue Frans. Mes Yan a Vontfort hag a ouie n'evoa nemet koll da gât diouz an tu-ze, a gavas gwell c'hoari dre finese. Aliet gant e wreg, Jann a Flandrez, e reas 'vel pa ne vije duk ebet nemetan, hag elec'h mont da Bariz, ec'h eas da Naoned. Eno 'n evoa mignoned, hag e oe anaveet raktal da vestr gante, koulz ha gant ar c'hêriou bihan diwardro.

Gervel a reas neuze da Naoned eskibien ha baroned Breiz. Mes, da c'hortoz, arabad oa d'ean chom da baouez. E yalc'h a oa gwall dister ; hogen, en kêr Limoj, e oa kef ha tensor an duk maro. Ar c'hont a redas en daou lamm, gant eun toullad zoudarded, betek Limoj, hag a digasas gantan kef hag arc'hant. Tudjentil Breiz, koulskoude, n'o devoa ket hastet founnus senti ouz peden Yan a Vontfort ; eur baron hepken a oa deut, hag an eskibien oa chomet holl er gêr. Ne oa nemet tud a renk dister, Breiz-Izeliz an darn-vuian ane. Ar c'hont a 'n em gavas eun tammig diskonfortet. Koulskoude, e reas eun digemer brao d'e vignoned. Dont a reas a-benn, evelse, da zastum endro d'ean

eur bagad mat a zoudarded hag a vare'heien. Eun toull mat, avat, a oe red ober en yalc'h an duk koz.

E oad neuze e fin miz mae 1341. Eur miz a oa e oa maro Yan III. Gantan, siouaz, e oa maro-ar peuc'h, ar peuc'h kaer a oa o ren en Breiz aboue kant vla, hag an evoa gret kement a vad d'ar vro. Eun amzer dishenvel a grog breman. Digor eo *Bre-ael Bleiz ha Montfort*.

Ar brezel-man a bado, etre peder reujad, eus an 30 a viz ebrel 1341, d'an 29 a viz gwengolo 1364, ha pa vo gret ar gont eus an holl emgannou bet epad an tri bla warnugent-ze, etre zoudarded Bleiz ha Montfort, e vo kavet daou vil tri c'hant,

Ar-reujad kentân a badas daou vla ; an eil, nao bla ; an dtede, dek vla. ar bevare, daou vla.

Ar brezel-man a dri bla warnugent a zo henvel awalc'h ouz eun tân, ha goude bean laketao daou vla da c'hôri ha da gregi, nao bla d'ober a reuz vras, dek vla da vihanât, a varvfe en daou vla diwean.



EIL PENNAD

Brezel Bleiz ha Montfort

(30 a viz ebrel 1341 — 29 a viz gwengolo 1364)

Loden Gentan

(1341-1343)

Ar Seziz war Naoned. — Montfort prizoniet gant roue arFrans. — Jann a Flandrez, gwir vrezellourez. — Ar seziz war Henbont. — Robert Artois hag Edouard III en Breiz. — Dihan Malestroit.

Neuze 'ta, Yan a Vontfort 'n evoa laketao en e benn gounit Breiz dre heg pe dre gaer. Bean 'n evoa breman ar peza oa ezom evit se : soudarded hag arc'hant.

Kuitât a reas Naoned gant eun arme a dek mil den ha stagan raktal war Raon, ker-benn hag eil

dor Breiz, diouz tu ar C'hallaoued ; Naoned a oa an nor-all. Dont a reas gantan diboan awalc'h. Kerzet a reas ac'hane da Susinio, d'Alre, da Henbont, da Gemperle, da Gemper ha d'an holl gêriou a oa d'an duk koz. Brest a harzas eur pennad ; mes ar gouarner, Klison, eur mignon bras da Charlez Bleiz, o vean bet lazeta, ar c'hont Yan na gavas skoilh ebet ken hag a oe digemeret en Brest evel er c'hêriou-all. Achui reas e dro dre Sant-Brieg, Lamball, Dinan, Dol, Mauron ha Ploermel ; da lâret eo, gant ober daou viz, e kemeras pemzek kêr ha kastel. Duk e oa breman, ya, mar ne oa ezom da gât, evit se, nemet tensor ha madou an duked koz ; ha duk ne oa ket, mar oa ezom c'hoaz, ouspen, eus ôtrethur roue ar Frans ha grad vad an holl noblans vreton.

Tudjantil Breiz-Izel, evit gwir, a oa, peurvuian, gant Montfort, mes re Breiz-Uhel a oa gant Charlez Bleiz ; ar pezh na harze ket, koulskoude, an evoa Montfort gwell savet e stal en berr amzer, ha tapet, zoken, e lans war e gonsort.

Ar prins Charlez. pa glevas lavaret pegement a hent an evoa gret ar c'hont Yan, a yeas prim da gâte eontr, roue ar Frans, da c'houlenn gantan difenn e gaoz. Ar roue 'n evoa ken c'hoant. Gervel a reas da Bariz an holl baroned hag eskibien, evit disklerian pep-hini e ali, ma vije gouveet da biou e oa dleet rei dukaj Breiz, da Vleiz pe da Vontfort.

Kaset e oe kannaded da Naoned da c'hourc'hemenn d'ar c'hont dont da glevet ar varnedigezh a vije gret diwarnan ha diwar e enebour. Just awalc'h, e oa o paouez arruout eus Bro-Saoz, diouz bean bet o c'houlenn skoazel ar roue Edouard, enebour touet rouear Frans. Ne oe ket, eta, kalza brezh warnean da zenti, pan arruas gantan kelo da vont da Bariz.

Ober a reas meur a zonz arôk dibran e varc'h 'Benn ar fin ec'h eas, koulskoude, nemet e kasas gantan tregont marc'heg ha tri c'hant soudard.

Mes dal ma oe arru en Pariz, dirak ar roue, pa welas pesort stumm garo a oa warnean, e teuas d'ean aon ; setu hen da wiskañ dilhad eur mevel ha da dizrei da pimperlenn da gât e wreg da Naoned. Raktal e reas tro e gestel hag e gêriou, hag e tastumas enne boed, armou ha soudarded. Goude ze, 'n evoa ken d'ober nemet gortoz mac'h arruje adarre kelo eus ar roue.

Ar roue, mar 'nije gallet pakañ ar c'hont, an ije gret d'ean restol d'ar prins Charlez tensor an duk koz hag ar c'hêriou kemeret. En askont e oa tec'het kuit, tano ma oa e fri, n'hallas ar roue nemet dougen eur varnedigezh hag a lake dukaj Breiz etre daouarn Charlez Bleiz hag e wreg, houman o vean tostoc'h karr d'an duk Yann III dre he zad, hag a oa breur d'ean, 'vit ne oa ar c'hont a Vontfort ha ne oa nemet hanter-vreur.

Ne oa ken nemet lakat ar prins Charlez war e drôn.

Roue ar Frans a reas sevel pemp mil warnugent a zoudarded evit zikour e niz. An noblans uhelan eus Bro-C'hall a diredas da rei d'ean skoazel. An duk a Normandi, mab henan ar roue, a oe laketa en penn an arme.

Kerzet a rejont war eñn da Naoned, goude bean kemeret kastel Châteauceaux a oa war o hent.

Naoned a oa, adalek neuze, eur gêr vras, war he zro magoriou uhel ha krenv. Soudarded Charlez Bleiz na oant ket niverus awalc'h evit he c'helc'hian ; gant se, ar c'hont Yan a lavaras da Naoned diz chom sioul en o zie, n'o devoa tam da vean nec'het gant ar roue ar Frans.

Mes eur vanden tud yaouank, gwad tom en o gwaziou, n'alljont ket pad da viret ar gourc'hemenze ; mall e oa gante ober eur c'hrog gant an enebourien. Setu i da vont ermeaz, armet mat, ha da stagan war Vleiziz. Eun dizro rust o devoe. An trec'h a chomas gant Bleiziz, hag ar c'hont Yan a renkas, nebeut amzer goude, renti kêr d'an duk a Normandi.

Divizet e oe ive etreze ec'h aje ar c'hont da Bariz, da zinan ar peuc'h, gant ma hallje dizrei war e giz, forz pa 'n em glevje ar roue hag hen, pe ne rajent ket.

Mes Fulup IV 'n evoa ket ankouaet pesort tro an evoa c'hoariet ar c'hont d'ean, daou viz arôk. Eur wech tapet e du warnean, petra reas ken nemet e zerri er prizon.

Setu ar c'hont Charlez mestr, d'e dro, en Naoned. Ober a reas raktal evel an evoa gret Yan a Vontfort en e rôk : rei goueliou kaer da gêriz ha d'e vignoned. War ar memes tro, e c'houre'hemenas d'an holl gêriou, o devoa bet digemeret Yan a Vontfort, Roaôn, Kemper, Lambal, Dinan, Sant-Malo, Dol, hag all, kas d'ean, dre gannaded, o doujans hag o gwasoniez.

*
* *

Gant ze, an holl a gredas d'e, Montfortiz koulz ha Bleiziz, Gallaoued koulz ha Bretoned, e oa achu ar brezel. Mignoned Montfort na glaskas hini ane enebi pelloc'h. Piou an ije zonjet ne oa ket, adalek neuze, Charlez duk en Breiz ? Eur plac'h, dre he nerz kalon, a deuas a-benn da c'houean a-neve tân ar brezel.

E keit ma oa ar c'hont Charlez oc'h ober cher

d'e dud, en Naoned, ar gontez Jann, kemeret ganti plas he fried Montfort, he devoa dastumet ive he c'hosteen en kastel ar Vouden, en Gwened. He mabig tri bla etre he diouvrec'h, en em diskoueas d'e, hag e lavaras : « Setu aman hag a drec'ho 'vit e dad, rak me glasko d'ac'h eur c'habiten hag a roo d'ac'h kuzul vat. »

Mont a reas evelse, a gêr da gêr, gant an hevelep komzou, hag arc'hant da stlap, a vozadou. Entañet e oe ganti holl vignoned Montfort. Ar re a hallas, a diredas holl da 'n em stardan endro d'ei ha d'he mab ; kement a lore'h hag a dan a oa enne, mac'h ejont, zoken, da gas ar brezel war douarou Bleiziz, hag e kemerjont diou gêr, Redon ha Gerand. Ar gontez a reas eun dro dre he c'hêriou hag he c'hestel, evit lakat ane prest da zigemer koulz he mignoned 'vel hec'h enebourien.

He mignoned a oa ar Zôzon. Pa 'n evoa klevet e oa prizoniet Montfort, roue Bro-Zôz oa ét droug ennan. Kas reas soudarded da Vreiz, dindan ar c'habiten Robert Artois, evit difenn gwiriou e vignon. Mes ar goanv a arruas warne, hag e tizrojont d'ar gêr, hep bean gret netra, en eur lavaret kenavo da vla d'ar gontez ha d'he marc'heien.

Pa n'halle den harz ermeaz, — ar bla-ze, 1341-1342, e reas eur gwall oany, — e oe klasket eur stumin-all da vrezelli. Roue Frans a labouras da zistagan mignoned ar c'hont Yan dioutan, en eur lavaret e vije distolet d'e an holl dismegansou o devoa gret d'ar roue ha d'e niz. Gant ar c'hont, ar roue a c'houlennas ma vije hadbarnet, en Pariz, ar prosez a oa etrezan ha Charlez Bleiz ; mes na Montfort nag e vignoned n'o devoa fianz ; eun dihan-brezel a oe zinst, da vont eus miz meurs betek ar 15 a viz ebrel 1342 ; ar garante etreze n'eas ket pelloc'h.

Er mare-ze, ar gontez, gwreg Monfort, a reas emgleo, da vat, gant roue Bro-Saoz. Anzav a reas anean 'vit roue Frans, en hano he fried hag en he hini, ha kinnig d'ean he gwasoniez evel dukez a Vreiz. Disrannet mat e oa breman an diou gosteen.

*
* *

Pan arruas miz ebrel, Charlez Bleiz a gasas eun dijentil da c'houlén eun arme digant ar roue, evit peure'honid dukaj Breiz war e enebourien.

Tudjantil Bro-C'hall a diredas adarre da Naoned gant bagadou bras a zoudarded. Beañ e oa ane tost da ugent mil den, a gerzas raktal war Roaon, elec'h e oa mestr Montfort. Ar c'habiten, Kadoudal, a stourmas kalonek, en despet da dud kêr. Ar re-man, 'vel al loden vras eus ar Vretoned, na oant en tu ebet, hag a gave kri gwelet o madou dis-mantret ha dêvet, o zud mac'hagnet ha lazet evit zêrviji Bleiz pe Montfort. Serri a rejont ar c'habiten er prizon, ha renti kêr da Charlez ha d'e dud (1).

(1) En eur zôn da zansal dastumet gant an O. Kermarker en e *Varzas-Breiz* (pag. 201) e weler pegen dizeblant e oa ar bobl ouz an diou gosteen, Bleiz ha Montfort. Kaz an evoa oute, zoken, abalamour d'an droug a re ar brezel d'an dud dister. 'Barz ar zôn, a komzer eus tri loen : eur c'hole-taro (kosteen Montfort), eur blei (kosteen Charlez Bleiz) hag eun herminig (ar bobl vreton). Keit eman gwilhaou ar blei ha Yan ar c'hôle o 'n em bigosat.

Katellig-fur, an herminig.
A c'hoarze a-rez he zoullig.

Allas, eme katelligi.

Prajou o deus int tremenet,
Poazi ar geot int o deus gret ;
Parkou deus int treuzet,
Na c'hreunio na kerc'h nag ed ;
Ne vronso gwe el liorzo,
Pikous ar bleun 'vel gant ar glao,

Ar re-man a dôlas o lagad neuze war kêr Henbont, elec'h 'ma oa 'n em dennet ar gontez Jann. Mar vije kemeret ar gêr-ze, ha dreist-oll, an hini a oa ebarz, e oa achuet ar brezel 'n eun tol krenn. Ar wech 'n em gavet pen-diberc'hen, Montfortiz a renkje plegan.

F'in miz mae a oa, pan arruas an arme dirak Henbont. Ar gêr na oa ket bras, mes magoriou mat he devoa a du an douar, ha frankiz a du ar mor.

Bleiziz a zavas o c'hamp tro-war-dro d'Henbont, ha, hepdale, e rejont eur c'hrog warni. Henbontiz a rebarbas oute gant kalon, en o fenn ar gontez Jann. Houman a yee hag a deue dre ruiou kêr, armet evel eur pôtr, hag eur marc'h mat dindani. Mont a re, hep aon, elec'h e vije ar muian ezom a zikour, ha gant eun tol lagad hepken, hi a wele petra vije d'ober.

Eur zonzj a deuas d'ei, eur wech, 'kreiz an emgann, pignal war uhelan tour a oa en kêr, 'vit gwelet skleroc'h an doareou. Ac'hane, ha hi o töl plé an evoa dilezet Bleiziz o c'hamp, darn, evit emgannan, ha darn-all, evit gwelet an treo eus a dostoc'h. Ar gontez a diskennas prim diwar lein an tour, a gemeras ganti tri-c'hant den war varc'h hag a yeas ermeaz dre eun nor ha ne oa ket a Vleiziz war he zro. Souden goude, e oe gwelet ar moged o sevel en êr, hag eur c'hri, kerkent,

Me garfe, en gwirione,
'N em dagfent 'n eil egile !

Setu eno ar pezh a zonje ar bobl, dreist oll, bop ma hirrae ar brezel. Salaün ar Foll an evoa komzet en hano an holl Vretoned a renk izel, pan evoa respontet da zou darded an diou gosteen :

Nan on na Bleiz na Montfort.

etouez Bleiziz spouronnet : « Trai-
tourach ! » O c'hamp a-bez a oa o flaminan. Dê-
vet e oe, 'benn ec'h arrujont da glask sovetât eun
dra bennak. Ar gontez, avat, a oa tec'het. —
« Tapet e vo ! N'ey ket war he c'hiz en kêr ! »
Setu Bleiziz, gant ar c'hri-forz-ze, oc'h ôber ar
vardel endro da Henbout, da c'hortoz pegoulz e
tizroje ar gontez. Houman na dizroas ket. Ker-
kent ma oe gret ganti he zol, e huchas d'he zou-
darded : « Da Vrech breman ! » Hag evelse e
tromplas adarre hec'h enebourien, rak da Alre an
hini 'c'h eas, d'ar pevar lamm ru (1).

Bleiziz a estlamme hag a gounnare. Da viha-
nan, ar gontez Villiget na oa ken en kêr evit
stourm oute, hag evelse, e vije ezetoc'h d'e dont
a-ben eus Henbontiz.

Mes ar gontez a Vonfort oa arabad d'ei ankouat

(1) An töl kaer-man a dalvezas d'ar gontez an hano a
Janedig-Flamm, kinniget d'ei gant ar bobl.

Eur zôn a oe gret d'ei ive; laket eo bet gant an O. Ker-
marker en e *Varzas Breiz*. Setu ar pôziou divezan :

Ha Janedig-Flamm a c'hoarze,
'Toull he fenestr, ar mintin-ze,

War ar mêz, pa devoa sellet,
O welet ar c'hamp distrujet...

Ha Janedig-Flamm a c'hoarze :

— Pebez maradeg, ma Doue !

« Ma Doue ! pebez maradeg !
Evit eur greun, ni hon bo dek !

« Gwir a laréd, amzer gwechall :
N'eus netra koulz hag eskern gall,

« Koulz hag eskern gall bruzunet,
Da lakat da zevel an ed. »

(*Barzas Breiz*, pp. 193-194).

N'eus ket ezom da lavaret ne welas ket Janedig-Flamm
ar c'hamp distrujet, p'eo gwir e oa tec'het da Alre. Mes
netra bravoc'h d'achui ar zôn,

Henbontiz, he mignoned. 'Benn e oa bet pemp de
en Alre, e tizroas war he zud hag e lavaras d'e :

— Henbontiz, emei, a zo nec'bet abalamour
d'in. Red eo d'in mont da gennerzan ane. Me
lavaro d'ac'h penôs ec'h efomp en kêr.

Setu int war varc'h hag en henchou. Da der
heur eus ar beure, en em gavjont dirak kamp
Bleiziz. Ar gontez a gasas neuze eun nebeut eus
he zoudarded trezek korn ar c'hamp ar pellan diouz
ar magoriou, ha keit ma oa ar re-ze o luian an
enebourien, hi hag ar re-all a yee en ker dinec'h.

Gant pebez levenez e oent digemeret ! An trom-
pilhou o son, an dud o youc'hal a gasas kelo da
Vleiziz e oant paket adarre Gant a droug a oa
enne, e lampjont da grapat war magoriou kêr ;
mes da der heur goude kreizte, e renkjont kilan,
hep bean goneet netra.

Charlez Bleiz a oa arru feaz o welet ne deue man
d'ean d'ar gêr. Hag hen o rannan e arme etre daou,
o vont gante eun hanter da lakat seziz war Alre,
hag o lezel an hanter-all dirak Henbont.

Loeiz ar Spagn, eun dijentil a oad rouane ar
C'hastilh, a oa bet laket gant Charlez e penn ar
re-man. Ober a reas digas eus Roaôn benviou bre-
zel da stlap, gant ar magoriou, mein pounner d'o-
ber d'e brallan ha rannan. Ar gontez Jann a 'n em
gavas gwall nec'het, dre ne wele ket a zikour o
tont d'ei, hag e naskont da dudjentil hag a c'houlle,
an eskob er penn kentan, ma vije rentet kêr da
Vleiziz. Kaer he devoe stourm, pedi, gouelan, e oe
laket d'ei, eun dro bennak, eun termen a bemp de.

Eun devez, daou devez a dremenas ; mes setu
an dried de, e oe gwelet listri ar Zôzon o tispakan
war ar mor, o tont da digas sikour da gêr. Ar
gontez a zemplas gant ar joa ; mes ne oe ket pell e

savas hag a redas betek ar porz mor, evit digemer he mignoned. Gant al levezenez, e vriataas ar gabi-tened holl, da gentan Amauri a Glison, kurator he mab, hag ar Zaoz Gautier Manni.

Adalek an de warlec'h, Saôzon ha Betoned a 'n em glevas evit mont da distrujan ar stlaperezed mein a re kement a c'haou ouz ar magoriou. 'Benn e oe noz, ne oa hini ebet ken en he zav. Bleiziz a oa koll adarre.

An töl-man a lazas ane; tec'hel a rejont, goude bean c'houeet an tân en o c'hamp, hag ec'h ejont da gât Charlez Bleiz dirak Alre.

An treo a gerzas gwelloc'h diwar neuze. En eur ober tri miz, gouere, est ha gwengolo, e oe kemeret gante eul loden vras eus Breiz, hag eun niver a gêriou, evel Alre, Gwened, Gerand, Keraez, Jugon...

*
*
*

E keit-ze, roue Bro-Saôz a zave eun arme-all da gas da Vreiz, warlerc'h hini Gautier Manni. Eur miz goude ma oa dizroet heman d'ar gêr war e giz, an 18 a viz est 1342, 260 lestr karget a zoudarded, — pemp mil a oa ane, — a ziskennas en kichen Brest, hag 'a gavas eno Charlez Bleiz deut da lakat seziz war gêr. 'N eun töl, ec'h eas an trec'h gant ar Zôzon, ha Bleiziz a renkas tec'hel. Charlez a yeas betek Gwengamp, evit zevel eno soudarded, rak ar Zôzon hag o mestr, Robert Artois, gant a foug e oa enne, a oa ét a-benn-kaer da sezian Montroulez, kêr vleizek. Mes re nebeut a dud a oant, hag e vanjont eno soc'het. Kelo a deuas da Robert e oa Charlez Bleiz o tont d'ean gant tregont mil soudard; hen da hastan dibab eul lec'h mat da 'n em difenn; etre Montroulez ha Lanmeur, e

kavas e c'hoant, hag eno, war lez eur c'hoad, e teuas a-benn, gant pemp mil den, da harz ouz arme vras Bleiziz: treuzi reas anei, zoken, ha dont war e giz dirak Montroulez. Charlez Bleiz a lezas anean d'ober e benn, hag a skoas warzu Henbont, e zonj da gemer ar wech-ze kêr, ha, marteze, ar gontez Jann, a oa bepred enni.

Mes Henbont oa ét war grénvât aboue miz even. Ar magoriou a oa bet hadgret, ha kaer an evoa ar stlaperezed mein, — c'houezek a oa dastumet tro-dro da gêr, — pilat ane eus a bep tu, ar magoriou a chome diflach, ha Henbontiz a c'hoarze gwap, en eur dorchan gant o zokou ar plas 'lec'h ma vije koueet pep men.

Ar goanv a dostae, ha gantan riu ha kast amzer. Tudjentil Frans a 'n em droas an eil warlerc'h egile, da glask hent ar ger, c'hoant gante da 'n em lakat er gwasked, ha setu Charlez o renkout adarre kuitât Henbont, hep bean goneet netra (18 a viz here 1342).

Kement-all a oa c'hoarvezet gant Robert Artois, dirak Montroulez. Ne oa ket 'vit kaout krog war ar gêr-man, kaer an evoa, hag e renkas ive dilezel.

Mes elec'h mont da ziskuizan, e lakas 'n e 'benn c'hoari e bôtr mat, pa ne oa den da stourm outan. Hen da Vrest gant e zoudarded, o pignal gante war listri, hag o vont, dre vor, betek bro Naoned, elec'h ma oa Charlez oc'h ober eun tenn-alan.

E zonj e oa kouean warnean, hep goût doare d'ean, hag ober e ran emesk e dud hag e zoudarded.

Mes diarbennet e oa bet Robert, — n'ouzer dre benôs, — hag hen an hini a oe darbet d'ean kouean n eur pech stignet war e hent gant Bleiziz. Red e oe d'ean mont war e giz, dre zouar, ar wech-man, rak darn eus e listri a oa bet pakët,

Mes Robert a oa eun den dilu hag eun den dis-
pont. Pan halle ken kregi war Naoned, ec'h eas da
lakât seziz war Wened. Rivinan a reas, da gentan,
ar vro tro-dro, laerez ha tñnan. Goude ze, en em
gemeras ouz kêr, difennet gant gwellan ofiserien
Charlez Bleiz, Klison, Loheac, Tournemin ha
Leon.

Ar re-man o devoa kalon awalc'h hag anaou-
degez ive; mes Robert an evoa art ha gant e art e
trec'has. Kemeret e oe gentan kêr, 'kreiz eun noz
tenval, ha chaseet Bleiziz.

Kaset e oe kelo d'ar gont'ez Jann, da Henbont,
da zont da lidan eun darvoud ken kaer.

Mes Klison hag e vignoned, mezek ha koun-
naret, a dizroas war o c'hiz 'vit kêr o digoll.

Robert a 'n em difennas 'vel eur c'hi. mes Gwe-
nediz a goueas ive war e lâr, pa grede d'ean bean
zikouret gante, ha n'hallas, nemet a-boan, tec'hel
kuit ha redek betek Henbont.

'Benn ec'h arruas eno, e oa, koulz laret, maro,
goloet a wad, leun e gorf a c'houliau spontus. toul-
let ha troc'het ma oa dre oll o doliou bir hag a
doliou kleze.

An deiou diwean a viz here e varvas.

E dro en Breiz na oa bet nemet eun dremen-
aden, mes pebez tremenaden ! En eur ober daou
viz, man nemet 5.000 den d'e heul, an evoa argaset
Bleiziz a ziwardro Brest, devet pevarzek lestr,
skubet dirakan eun arme a 30.000 den, treuzet
Breiz eus eur penn d'ar penn-all, ha kemeret
Gwened, unan eus gwellan kerioù an evoa Bleiziz.

* *

Roue Bro-Saoz an evoa divizet e teuje ive da
Vreiz warlerc'h e letananted, evit dizoc'han al
labour boulc'het gante.

Gaultier Manni a oa deut, da gentan, an 20 a
viz mae 1342, ha diskennet en Henbont; Robert
Artois oa deut an eil, an 18 a viz est, ha disken-
net en Brest; ar roue a deuas an 30 a viz here,
hag a ziñennas ive en Brest.

Bean oa gentan endro da drizek mil a zourdard-
ded. Ar Vretoned eus kosteen Montfort a zavas
d'ean tri mil ouspen.

Ober a reas diou loden gante, pa oe arru en
Keraez : unan a dlee mont da lakat seziz war
Roañ, hag eben, war Wened, en eur gemer war
o hent an holl gêrioù a oa da Vleiziz.

Pa oe arru damdost da Wened gant e arme, ar
roue a lodennas anei adarre, hag a gasas eun
hanter dfrak kêr Naoned, e zonz he c'hemer.

Eur wech mestr da Wened, evel ma oa dija da
Vrest, mestr da Naoned ha da Roañ, alc'houeo
Breiz-Izel ha Breiz-Uhel a oa en e zorn.

Bleiziz, avat, red d'e souzan 'vel dirak an tñn,
bop ma teue ar Zôzon warne, a grie forz war roue
Frans.

Charlez Bleiz a yeas d'e gât da c'houlou digan-
tan eun arme.

Dre hrr gortoz, en em gavas dastumet, da viz
kerdu, hanter-kant mil den en Anje, ha roue
Frans en o fenn, prest da gerzet gante eneb roue
Bro-Saoz.

Heman, pa glevas lavaret e oa kement-se a dud
o vont da gouean warnean, a hastas dastum ive,
endro da Wened, ar zoudarded an evoa kaset da
Roañ ha da Naoned.

Evelse, an deiou diwean a viz kerdu, an daou
roue, gant o zud, a 'n em gave war bouez c'houec'h
leo an eil diouz egile, unan en kichen Gwened,
egile en Ploermel, prest da stagan.

Bet e vije eur gwall grog, a dra zur, paenvert daou gannad, daou gardinal kaset gant ar Pab, hag a deuas a-benn da lakat peuc'h etre an diou gosteen. Sinet e oe etreze, en Malestroit, an 19 a viz genver 1343, eun dihan-brezel hag a dlee padout betek gouel-Mikel. Mar ne vije ket gret ar peuc'h da vat, 'benn gouel-Michel, an dihan-brezel a vije hirraet ha kaset an termen anean betek gouel-Mikel 1346.

An diou arme a zisilhas neuze, hag ar zoudarded a dizroas pep-hini d'e gêr.

Gant re Montfort, avat, ec'h ee al lore.

Eil loden ar Brezel

(1343-1352)

Trubarderez roue Frans. — Jann a Flandrez a goll he spered. — Montfort a varv en Henbont. — Roue Bro-Zôz a zalc'h penn da Vleiziz. — Ar brezel en Treger. — Seziz Lanuon : ar Pontgwen. — Charlez Bleiz tapet prizonier er Roc'h. — Ar Zôzon, muntreien Breiz. Stourm an Tregont. — Emgann Mauron.

An dihan na oa ket 'vit pad pell. Roue Frans n'e ket e zin lakete traou eur paper a halle harz anean d'ober e benn, hag e benn a renkas ober.

Etouez an noblans vreton hag a oa gant Montfort, bean oa unan, neve c'honeet, d'an tu-ze, Olier Klison, hag an evoa ar roue outan kalz droug ha kasoni. Kregi a reas ennan, dre drubarderez, hag ober troc'han d'ean e benn. Kement-all a reas da dek dijentil-all hag a oa ive en tu Montfort.

En Breiz-Izel, e savas hu, skrign-dent ha klemvan truezus warlerc'h ar roue traitour. Montfortiz a gasas raktal kelo da Vro-Zaoz.

Mes ar roue Edouard, pe e oa skuiz, pe e oa treo-all war e spered, a reas skouarn-vouzar. Ar zikour a gasas a oe nebeut a dra, eur mil a zoudar-

ded, ha n'arrujont c'hoaz nemet pevar miz goude an torfed.

Charlez Bleiz, pa deuas miz ebrel, a zavas eun arme hag a gemeras Kemper. Goude e kemeras Gerand. Montfortiz, chouchet en o c'hêriou, na gredent ket finval. Ar c'hannaded a gasent da Vro-Zaoz e teue gante d'ar gêr mui a bromeseou kaer 'vit a zikouriou mat. Karet o dije gwelet, da vihanan, o mestrez, ar gontez Jann, hag a oa ét gant he mab da Vro-Zaoz, o tizrei davete. Kement a rejont o terc'hel war ze, ma oe red anzav oute ar wirione : ar gontez a oa deut sod.

Eur gwall dól evit Montfortiz, mar sonjer e oa, gant ze, Yan a Vontfort er prizon hag e vab en e vailhurou.

Kredi reas d'e e oa trec'het o c'hôz ar wechman. Roue Frans a zalc'he bepred da gastizan gant krizder gwellan mignoned ar c'hont a Vontfort ; en miz here 1344, e reas lazan c'hoaz unan ane, eur beleg, Herri Malestroit.

Mes soudan, ar vrud a zavas er vro ne oa ken Montfort er prizon. Gwir e oa ; loskaet e oa bet, nemet e renke, dre urz ar roue, chom en Bro-C'hall ha tremen hep lakat e droad en Breiz.

Montfortiz, diskonfortet evel ma oant, a gredas d'e ne oa ze nemet eun digare klasket gant ar c'hont, hag e oa, en gwirione, o c'hedal ober ar peuc'h gant roue Frans ha lezel gant Charlez Bleiz dukaj Breiz, 'vit eun digoll bennak ahendall. Setu e lavarjont etreze : « Montfort an evo e zigoll, mes ni a vo krouget pe dibennet gant roue Frans. Hastomp ni ive ober ar peuc'h ».

Neuze e oe gwelet ar pennou-bras eus kostean Montfort, Klison, du Châtel, Spinefort, o tont da c'houlén pardon digant ar roue Fulup ha Charlez

Bleiz, en eur douet ne rajent ken a c'haou ouz heman, hag e vijent, hiziviken, doujus ha sentus en e genver.

Benn an deiu kentan a viz genver 1345, kostean Montfort a oa 'vel ét da netra, ha heman, dinec'h, dibreder, a leze bepred an treo da vont war an tu a garent. Petra 'ta oa c'hoarvezet gantan ? Netra ken, nemet ne ouie ket penôs e oa kont na gant e wreg na gant e vignoned.

Gant goueliou Pask 1345, e tigoueas d'ean klevet ar wirione. E galon a vennas rannan. Kerkent e tôlas war e choug gwiskamanteur marc'hadour-red, hag hen da dapout eul lestr er porz-mor nesan, ha da Vro-Zaoz.

Goude bean gouelet e walc'h dirak e wreg sod, e c'houllas skoazel digant ar roue Edouard. Ar 7 a vezeven, ar zikour a oa prest, da laret eo, eun arme vras hag a ziskennas en Brest wardro an 12.

Ar c'habiten saoz, Tomas Dagworth, a skoas kerkent trezek Roaón gant e zoudarded. Tost da Joselin, en lanneg Cadoret, en em gavas gant arme Bleiziz. Ne harzas ket houman pell outan ; mes elec'h derc'hel da vont war rôk, e renkas dizrei war e giz da Gemper, evit zikour lakat seziz war ar gêr-ze, bet kemeret gant Charlez Bleiz. Eno e weljod bodet adarre, endro d'ar c'hont Yan, e holl vignoned gwechall, o devoa bet gret ar peuc'h ha goulennet pardon digant roue Frans.

Kemper en em zifennas start ; da viz est e oa bepred ar Zaozon hag ar Vretoned diraki, n'o devoa goneet netra.

E keit-ze, Charlez Bleiz an evoa dastumet ive eun arme, hag e teuas ganti da rebarb ouz Montfort. Heman a renkas souzan gant e dud, hag e oe darbet d'ean, zoken, bean paket goude an emgann.

Gallout e reas tec'hel betek Henbont. Eno e oa ar maro o c'hortoz anean. Skoët e oe klanv, hag ar 26 a viz gwengolo e tremenas.

* *

Ne chome ken nemet eur bugelig pemp bla da stourm ouz Charlez Bleiz. Mes roue Bro-Saoz a gemeras en e zorn ar c'hleze koueet en lod ar bugel, hag a zalc'has gant ar brezel evel diagent, mes en eun doare kalz krisoc'h.

Adalek breman, ar Zaozon a rey da Vreiz ar vilan 'r gwellan, hep sellet muioc'h ouz mignoned eget ouz enebourien. Ar pezh a glaskfont a vo ten-nan diouz ar vro ar muian a c'honid a c'hallfont, touzan, kignat, gwadan anei, ken, d'ar fin, ne chomo diouti nemet ar relegou.



Seizh Lanuon. -- Emgann ar Roc'h

(1345-1347)

Betek hen ive, an tñn hag ar brezel o devoa redet dre Vreiz, eus a Vrest da Roaon ha da Naoned, hep ober gaou ouz Bro-Treger. Northampton ha Dagworth, letananted roue Bro-Saoz, a glaskas eun dro-all da vrezelli hag a 'n em dôlas war Dreger ha Penteur, douarou Charlez Bleiz.

Northampton a bartias, an 29 a viz du 1345, e kreiz an noz, eus Keraez ; da c'houec'h heur eus ar beure, da dol an Anjelus, e oa dirak Gwengamp. Ne oa ket e zonz kemer kêr, mar vije stourmet re outan ; gant se, ne reas nemet dêvi ar fabourkou, en eur dremen, ha skei trezek ar Roc'h.

War ar gêr-zé e oa e zell, dre ma oa war ribl ar mor, difennet mat gant he magoriou hag eur c'hastel-krenv, hag enni nebeut a zourdarded. Tri de, ne badas ken stourmadeg Roc'hiz. An 3 a viz kerdu 1345, e rentjont o c'hêr, gant ma vije espernet o madou hag o bue.

Ac'hane, Northampton a yeas da lakat seizh war Lanuon. Ar goanv, koulz ha nerz-kalon Lanuoniz, a reas d'ean souzan ; dizrei a reas da Vro-Leon, o lezel war e lerc'h eul loden eus e arme, evit miret ar Roc'h ha gwadann ar vro.

Ar Zôzon a oa dispar 'vit an dra-man. An dud n'o dije ket a vagoriou d'o difenn, ar re-ze vije drastet o madou, laket da baeen truajou ha, daoust pegen bras a vijent, na gargent gwech ebet yalc'h d'ôn.

ar laeron. Kêr Landreger a c'houzanvas, da gentan, ar reuz-ze warni. Eno ne oa na magor na kastel, hag ar Zôzon a bakas kement a oa en kêr ; ne espernjont nemet an iliz, dre doujans evit sant Erwan.

Goude Landreger, Lanuon. Meur a wech e tizrojont war ar gêr-man, epad ar bla 1346 ; ne deujont a-benn anei nemet dre dreizoni. Kât a rejont, etouez an difennourien, daou hag a asantas gwerzan o c'henvroiz, evit eur yalc'had arc'hant. Eur zul, beure mat, e tigorjont an dorojou. An de-ze, ne oe ti ebet en Lanuon ha ne oe ruiet gant ar gwad. Lanuoniz tapet e kreiz o c'houk, na oant ket 'vit 'n em difenn, hag a gouee evel denved, dindan dôliou ar Zaozon milliget. Unan, koulskoude, mar oe lazet, na oe ket hep enebi.

Hennez oe ar marc'heg Javre Pontgwenn.

Dihunet gant an drouz, e lampas war e armou hag e redas ermeaz e di, hanter-wisket, en eur huchal a-bouez penn : D'an armou ! Gant e gleze 'n eun dorn, hag e goaf en dorn-all, e laz an tri Zôz kentan a gav war e hent. Ar goaf a dor en e zaouarn ; neuze, e labour gant e gleze. O welet anean ken têt gant e dôliou, ar Zôzon a dec'h betek eur blasen 'lec'h ma 'n em gavont niverus. Mes Javre a harpe gein ouz eur vagor hag a zalc'h penn d'e holl ; ne dosta hini outan a gement na ve lazet pe gwall dizet. Yan zôz, an digalon zo anean, a ra neuze kerc'hat eun archer da dennan eus a-bell war ar marc'heg kalonek. An archer a distag gantan eun tol bir etre juntou e c'hlin. Allas, gant ar boan, n'e ken evit finval. E enebourien, evel eur bagad chas, a 'n em dol neuze warnean holl asambles, ha pell goude ma oa maro, hen skoont c'hoaz, da diskargan o mez hag o c'hounnar. Betek e zent a dorront d'ean en e benn. Yudazien milliget !

Charlez Bleiz na daleas ket da ziskouel e anaoudegez vat da vab ar marc'heg Pontgwenn ; dek mi lur leve a ginnigas d'ean.

Kêr Lanuon a dalc'h hirie c'hoaz eur groaz e korn an ti 'lec'h e koueas ar Breizad feal.

Goude bean rivinet Lanuon ha kaset gante prizonerien a-leiz, ar Zaozon a dispennas ar magoriou hag a dizroas d'ar Roc'h. War o hent, e helpennjont soudarded Charlez Bleiz, deut eus a Wengamp, evit stourm oute.

Ne oa ket ar çhans a-du gant Bleiziz. Paket e oent adarre, en mezeven 1346, gant ar zôz Dagworth ; mes ar gwasan lamm o devoe hag a c'hlaç'haras ane, a oe en emgann ar Roc'h, eur bla goude.

Charlez Bleiz a oa rannet e galon o welet gant pebez krizder e oa gwalet Bro Treger ha Penteür gant ar Zaozon. Plijadur o devoa ar re-man o waskan Tregeriz mui 'vit ar Vretoned-all, dre ma ouient e oant nesoc'h da Charlez Bleiz. Heman a wele awalc'h, keit o dije troad er Roc'h, n'hallje biken skarzan ar vro dioute, hag e savas eun arme evit lakat seziz war ar gêr-ze. An dud diwardro a deuas gant prez da rei zikour d'ean : ne rent forz petra d'ober na pesort dispign da gemer, nemet e vije chaseet ar Zaozon milliget. Charlez an evoa gret digas stlaperezed mein hag a dôle war gêr peziou rec'hel a 300 lur bouez. Ar Zaozon a oa spouronnet ha prest da 'n em renti, evit espern o bue ; mes an duk na felle ket d'ean achui ar c'hro-gad, ken ma 'n ije bet an heur da welet dirakan e enebour gwasan, ar c'habiten Dagworth, ha da rei d'ean lamm.

Heman oa en Keraez. Ne chomas ket da zale ; ar beure, 20 a vezeven, war dro diou heur, e koueas war Vleiziz, arôk ma oant dihun. Daoust

da ze, ar re-man a deuas a-benn da gemer o zrec'h ; dija Dagworth a oa prizonier etre daouarn ar prins Charlez, pa deuas Saozon ar Roc'h da lammat ermeaz kêr ha da dapout Bleiziz etre daou dân.

Charlez a renkas souzan ; pignal a reas neuze war veg tosen ar Maezou, hag eno, gant eun nebeudig mignoned, en em difennas gant eur galloud hag eun nerz-kalon dispar. Seitek gouli a oa war e gorf, pa goueas, goloet a wad, war eur bern enebourien lazet gantan. C'hoaz n'houllas ket rei e gleze d'eur Zôz, nemet d'eur Breton.

Laket e oe war eur c'holc'hedad plu digaset d'ean gant eun ine mat. E oa eno astennet 'vel eur c'horf maro, pan arruas Dagworth, droug ha kasoni 'n e galon. Ar c'holc'hed plu a gavas oa re evit e enebour glac'haret ; tennan a reas anei digantan, hag ober tôl anezan war ar plouz. Charlez na zavas ket e vouez evit 'n em glemm. Er c'hontrol, o vean trugarekaet Doue, e lavaras biken ken ne c'hourvezje war ar plu. Eno e reas ive ar promesse da vont diarc'hen da ve Sant Erwan, mar tennje c'hoaz e vue hag e frankiz a-dre daouarn ar Zôzon.

Ac'hane, e oe douget da Geraez, ha goude da Gemperle ; d'an diwean, eo'h eas da Wened. Eno e chomas eur bla hag e c'hallas gwelet e bried, ar brinzez Jann. Er bla 1348, e oe kaset da Vro-Zôz, goude bean tremenet eur pennad en Brest. Ne oa ket pare c'hoaz, pa oe gret d'ean beaji ; koulskoude, ne glaskas ket tenerât e enebourien, nemet en em didui, gwellan m'halle, dre ar beden hag ar muzik.

Ar Roc'h na chomas ket pell gant ar Zôzon, kaer o devoa bean krenv. Roue Frans a gasas di soudarded, hag ar re-man a gemeras kêr, en miz est.

Mes kement-se na oa ket evit dic'haouan Bleiziz. Barz emgann ar Roc'h, o devoa kollet ar c'hrenvan

eus o marc'heien hag eus o noblans. Ha ne oa ket awale'h ar c'holi tud, koll arc'hant a oa ive, na pa ne vije ken nemet ar bern aour a renke ar brinzez Jann diouered evit he fried, ar pezh a reas d'ei kouean dindan he bec'h evit 'pad he bue.

Ar wech-man, Bleiziz a oa tapet dindan. Mes gant ar gosteen-all, ne oa ket kalz krenvoc'h an treo : mab Montfort a oa etre daouarn roue Bro-Zaoz ; e dad a oa maro. e vam a oa sod, hag hen n'evoa ket a nerz da gregi 'n eur c'hleze.

Gwir vestr Breiz, d'ar mare-ze, a oa ar roue sôz, rak ouspenn ma 'n evoa trec'het war Charlez en emgann ar Roc'h. trec'het an evoa ive war roue Frans, en emgannou « Crécy » ha « Calais ».

Mar karje, an ije achuet raktal brezelliou Breiz, a bade c'houec'h vla oa, ha gret eun duk gant mab yaouank Montfort.

Mes ar Zôzon, n'e ket mad Montfort a glaskent, o mad o-unan an hini oa. Gwell oa gante, betek pa oant mestr, chom da ren war Vreiz, abalamour gallout tennan d'o yalc'h kement mad a oa enni.

Klevet penôs e oa gouarnet ar Vro-man gante.

Roue Bro-Zôz a feurme Breiz a-bez d'eul letanant bennak dibabet gantan, ha heman a dlee magan, diwar e c'hodel, au holl soudarded sôz deut da vrezelli. Al letanant, 'vit 'n em denn, a ginnige d'e gabitened ar c'hêriou hag ar c'hestel kemeret war Vleiziz, gant ma paejent gouel-mikelez d'ean ha d'arroue. Penôs en em gemere neuze ar c'habitened ? Lakat trujou pounner war an dud, koulz er c'hêriou 'vel war ar mêz.

Pa digouee ar Zôzon en eur vro, kentan rent vije lavaret d'an dud : « Mar ne garet ket e ye rinset ho tier hag ho parkou, hag e vec'h laket e noaz, e pafet d'imp kement ha kement. Breman, mar ne garet

Stourm an Tregont

Eun de eus ar blavez 1351, unan eus kentan dijentiled Breiz, Beaumanoir, o vean 'n em gavet gant ar c'habiten zôz Pembro, den kri ha didrue, a damallas d'ean e laeronsiou hag e vuntrou, o lavaret n'o devoa ar Zôzon na kalon marc'heg, na kalon gristen o wal-gas an dud dister evel ma rent. Yan zôz a 'n em gemeras, hag a êsaas difenn e drubarderez. Ar marc'heg breton, têt e gomz hag e zellou, a respontas :

— Ma, Doue da varno ac'hanomp ! Kemeromp, eus a bep kosteen, tregont pe daou-ugent marc'heg ; greomp eur c'hrog etrezomp, hag e vo gouveet neuze e pesort tu eman al lealded !

Ar c'habiten zôz a oa gwiridik e lêt. Mat e oa da lazan ar paour kez labourerien, 'barz eur marc'heg seurt gant Beaumanoir, ne fizie ket re skei e zent. N'eus forz, gant ar vez, ne gredas ket souzan, hag e oe divizet raktal pelec'h ha penôs e vije savet an emgann : ar Zôzon a dibabje tregont eus o marc'heien hag ar Vretoned kement-all ; ar zadorn, 26 a viz meurs 1351, en em gavjent, etre Joselin ha Ploermel, en eul lanneg vras, e kichen eun derven a vije gret anei « Derven an Hanter-Hent », hag eno, an triugent marc'heg a 'n em gannje er stum ma karjent ha gant an armou a garjent, 'c'han an ije trec'het eur gosteen.

Beaumanoir a oa kabiten en kêr Joselin. Dibab a reas, etouez ar varc'heien a oa eno, nao warnu

gent, holl tudjentil ha Bretoned rik. Bembro a dastumas ive endro d'ean Sôzon eus e renk ; mes ne gavas nemet ugent : pemp Breton a renkas da gemer eus kosteen Montfort, ha c'houec'h Alamand gopraet evit ar brezel.

Ar 26 a viz meurs, diouz ar beure, ar Zôzon a oe da gentan en lanneg an Hanter-Hent ; ar Vretoned a arruas eun tammig warlerc'h ; chomet e oant da govesât ha da gomunian arôk dont d'an emgann. Ar Zôzon ive a oa deut da welet ar stourmadeg, gant hast da c'hôut piau a vije trec'h. Roet a oe urz d'e, gant an daou gabiten breton ha zôz, da dec'hel pell eus ar gann, ha da chom sioul, forz petra a weljent o c'hoarvezout.

Neuze, an diou vanden a bellaas an eil diouz eben, evit kemer o lans, ha pa oe gret eur zin, e redjont da 'n em stagan, krog ha krog, evel diou vanden vleidi kounnaret.

Ar Vretoned a dapas o fall : daou a oe lazet ha tri a oe tizet ha kemeret gant ar Zôzon. Ar pemp warnugent-all na golljont ket kalon. Ar gann a dalc'has 'c'han e oe divi ar zoudarded eus an daou du, hag e oe red mat ober eur pôz.

Hadkregi reas etre Bembro, ar c'habiten zôz, hag ar Breton Keranrais. Keranrais a doullas e dal d'ar Zôz gant eun tôl goaf, ha du Bois, eur Breton-all, pa felle c'hoaz da Bembro dizrei war Keranrais, hen achuas gant eun tôl bouc'hal en e greiz. Ar Zôzon a hanvas neuze Krokart da gabiten warne, hag a 'n em dastumas an eil stok egile, troet o armou trezek o enebourien, evel ma ra ar zaoud gant o c'herniou, pa zantont c'houez ar ar blei. Ar Vretoned a glaskas ober toull da vont warne, mes ne oant ket evit ober. An tôliou a strake, an dud a yude, ken e vije klevet an drouz

eul leo dro. 'Benn ar fin, ekoueas pevar Zôz maromik. Mes ar Vretoned ne oa nemet gwad oute. Beaumanoir a zo gwall c'hloazet, ha prest eo da zemplañ gant an naon hag ar zec'hed, o vean m'eo deut war yun d'an emgann, abalamour d'ar c'hoareiz.

— Sec'hed am eus ! emean.

— Ev da wad ! eme e genderv du Bois.

O klevet eur respont ken garo, Beaumanoir a lampas adarre war ar Zôzon, 'vel pan ije bet eun tól skourje.

Mes ar re-man o devoa 'n em addastumet etreze, o rei penn d'ar Vretoned dre bevar goste. Ne oa ken tu da vont warne.

Beaumanoir hag e dud e tivie o gwad hag o nerz, ha, kaer o doa, kammed na c'honeent.

Souden e oe gwelet unan eus ar Vretoned, Gwilherm a Vontoban, o tec'hel ermeaz eus ar gann. Prest awalc'h e vefe huchet harao warnean gant ar re-all. Mes n'a ket a-bell. Tapout a ra e varc'h, mont war e gein, ha 'rôk ma 'zo gouveet petra 'n eus c'hoant d'ober, e sko ar gentro en e gorf hag e sailh d'ar pevar lamm war vanden ar Zôzon. Henvel awalc'h ouz ar youl dero, pa goue 'mesk ar c'hilhou, war al leur, ar marc'heg hag e varc'h a ra reuz etouez ar Zôzon. Seiz a-diskar, 'n eur dreuzi o banden dreuz-da-dreuz. Dizrei a ra war e giz, hag e tiskarr adarre tri. Ar Vretoned, pa 'zo gret toull d'e, a 'n em dol, a blom, war o enebourien hag a laz pemp, ken prim 'vel laret chôu d'ar yar. An nebeut a vane na glaskjont ket stourm pelloc'h : plegan rejont pa ne oant 'vit ober ken, ha stouan gant o armou dirak Beaumanoir.

Ar c'habiten breton hag e dud, nemet tri a oa

bet lazet, a dizroas da Joselin, gant ar Zôzon kabestret, hag e oe gret cher vad d'e, n'eus ket ezom da laret. Eur spouron hag eul levenez a oa o gwelet o tremen, goloet a wad, toulllet ha didammet o c'hig en kant 'lec'h, ken ne dec'has ken biken diwarne ar merkoù enorus-ze.

Brud ar stourmadeg-man a yeas a-bell, hag a lakas ar bed-holl da estlammi.

Biskoaz n'eus bet gwelet par d'an tregont dijentil breton a 'n em gannas, evit difenn labourierien o bro, etre Joselin ha Ploermel, ar 26 a viz meurs 1351.

Eur werz gaer a zo bet gret d'e hag a vije kanet c'hoaz, pemp kant vla 'n o goude, pa 'n em gavas an otro Kermarker da glevet anei, 'n eur dremen en Plouneve-Kintin. He lakat a reas en e levr, ar *Barzaz-Breiz*. Setu hi aman pen-da-ben. Pa addeuo Breiziz da 'n em anaveout, int a desko hag a gano, evit rei kalon d'o mibien :

STOURM AN TREGONT

Ar miz meurs gant e vor - zo
liou, A zeu da skei war hon do - riou, Ar gwe a
bleg gant glao a builh, An doen a strak gant ar gri-
zilh,

Ar miz meur, gant e vorzoliou,
A zeu da skei war hon doriou
Ar gwe a bleg gant glao-a-builh,
An doen a strak gant ar grizilh

Hogen, n'e ket e vorzoliou,
Hepken, a sko war hon doriou,
Nan eo ket ar grizilh hepken
A lak da strakal an doen.

Nan eo ket hepken ar grizilh,
N'e ket ar glao a zalc'h a-builh,
Gwasoc'h eget avel ha glao,
Ar Zôzon fall an hini eo.

II

Otro sant Kado, hon paeron,
Roet-hu d'imp-ni nerz-kalon,
Ma c'honeimp, hirie an deiz,
War enebourien eus a Vreiz.

Mar deomp-ni d'ar gêr war hon c'hiz,
Ni a roi d'ac'h-hu eur gouriz,
Hag eur jupen aour hag eur c'hlenv,
Hag eur vantel c'hlas liou an nenv.

Ma laro an dud o sellet,
Otro sant Kado binniget :
« Koulz er baradoz hag en douar,
Sant Kado n'en deus ket e bar ! »

III

— Lavar d'in-me, lavar d'in-me,
Ped 'zo ane, ma floc'hig me ?
— Ped 'zo ane, leverin d'ec'h,
Unan, daou, tri, pevar, pemp, c'houec'h.

Ped 'zo ane leverin d'ec'h,
Ped 'zo ane, otro : pemp, c'houec'h,

Seiz, eiz, nao, dek, unnek, daouzek,
Trizek, pevarzek ha pemzek.

— Mar d'int tregont koulz eveldomp,
Arôk, pôtre, ha bec'h warnomp !
Prim d'o c'hezeg gant hon skourzal !
Ne debrfont ken glas hon zegal.

Ken buhan a gouee an tôliou,
Ha morzoliou war anneioù ;
Ken koenvet e rede ar gwad,
Hag ar waz goude ar barrad.

Ha ken didammet an harnez,
Eget pilhennou ar paourkez ;
Ha klemm ar varc'heien er c'hloaz,
Ken rust eget mouez ar mor bras.

IV

Penbroc'h a lavare neuze
Da Dinteniak, pa dostae :
— Dal tôl ma goaf mad, Tinteniak,
Daoust hag eo hen eur gorzen wak ?

— Pez a zo gwak, eberr amzer,
Pouden da benn, ma mignon ker ;
Meur a vran a skrapo ennan,
A beko boeden anean.

Oa ket e gomz peurlavaret,
Eun tôl morzol d'ean 'n eus roet,
Ken a flastras, 'vel melc'honen,
E dog-houarn koulz hag e benn.

Ha Keranreiz, dal m'hen gwelas,
A-skrign e galon a c'hoarzas :
— Mar chomfent holl evel heman,
Gonit a rafent ar vro-man.

— Ped ane 'zo maro, floc'h mad ?
— Ne welan man gant poultr ha gwad !

- Ped ane 'zo maro, floc'hig ?
— Setu pemp, c'houec'h, seiz, maro-mik !

V

Adalek goulouik an de,
En em gannont betek kreizte ;
Adalek kreizte betek noz,
En em gannont eneb ar Zôz.

Ha 'n otro Robart lavaras :
— Sec'hed am eus, ha sec'hed bras ;
Ken a droc'has outan Ar C'hoad :
— Mar teus sec'hed, pôtr, ev da vad,

Ha Robart, pa 'n eus hen klevet,
Gant ar vez, tec'hel en deus gret,
Ha war ar Zôzon eo koueet,
Ha pemp ane an eus lazet.

— Lavar d'in-me, lavar d'in-me,
Ped 'zo ane c'hoaz, ma floc'h me ?
— Otro, lavaret a rin d'ec'h,
Unan, daou, tri, pevar, pemp, c'houec'h.

— Ar re-man a vo losket beo,
Ha kant gwenneg aour a baeo,
Kant gwenneg aour flamm pep unan,
Abeg da vizou ar vro-man.

VI

Kar d'ar Vretoned na vije,
E ker Joslin nep na youc'he,
O welet hon re tont endro,
Bleun balan ouz o zok-houarno ;

Ne vije kar d'ar Vretoned,
Na d'ar zent a Vreiz, kennebeut,
Nep na veule ket sant Kado,
Paeron brezellourien ar Vro ;

Nep n'estlamme, nep na youc'he,
Nep na veule, nep na gane :
Koulz er baroz, 'vel en douar,
Sant Kado n'en deus ket e bar.

Fouge enne, Bleiziz a zavas o fenn. Roue Frans,
o vean marvet en miz est 1350, setu eun digare-all
d'ar brezel da strakal, rak Yan II, ar roue neve, a
oa en e waziou gwad bero ar yaouankiz, ha c'hoant
bras an evoa da c'hout dindan pesort planeden e oa
ganet.

Savet e oe eta eun arme gant letanant roue Frans
en Breiz, — Breiz, diouz tu Bleiz, 'vel diouz tu
Montfort, a oa renet breman gant eul letanant, —
ha skoet trezek Ploermel evit peurrei o c'hont d'ar
Zôzon gwall bofet gant ar c'holl o devoa gret en
Hanter-Hent. 'N em difenn a rejont, koulskoude, e
doare ma renkas Bleiziz dizrei gak, ha lakat eun
termen-all da gemer ar gêr.

Dizroet an neve-amzer 1352, Gui a Nesl, kabi-
ten-veur roue Frans, a zavas eun arme a bemp mil
den. Noblans uhelan Breiz a diredas endro d'ean,
prest da gerzet. Roue Bro-Zoz, e vean klevet ze, a
gasas ive eur c'habiten, Bentley ; heman a dastu-
mas tri mil zoudard. Ar Zoz a gemeras kêrig
Mauron, damdost da Bloermel. Gui a Nesl a hastas
mont da ziarben anean. Bentley a roas penn, ha
setu krog an emgann. Allas, 'benn e oa noz, Blei-
ziz o devoa 800 den lazet ; ar Zozon 600. An trec'h
a oa adarre d'ar re-man ; mes gwellañ tol o devoa
gret a oa diskar ar pennou uhellan eus noblans
Breiz, Rohan, Tinteniak, Kintin, Montoban, hag
all ; pevar ha daou-ugent marc'heg o devoa ledet
war dachen Mauron, ar re a oa chomet rak o zren
er Roc'h.

Terved loden eus ar Brezel

(1352-1362)

Charles Bleiz ha roue Bro-Zôz a-dud. — Bertram Gwesklen a-du gant Bleiz. — Lankastr en Breiz. — Charles Bleiz dizro da Vreiz. — Seziz Roaôn : Lankastr ha Gwesklen. — Dihan ha brezel. — Breiz a glask ar peuc'h. — Jann Pentetir n'houl ket.

Evit an eil gwech, e oa mestr ar roue zôz d'achui ar brezel ha da guruni mab Montfort. Ne reas ket. Kinnig ar peuc'h a reas adarre, evit gallout miret Breiz bepred dindan e zomani. Bleiziz, pa ne oant ken evit stourm a-hendall, a 'n em lakas da zastum arc'hant evit tennan o duk diouz ar prison.

Evelse, en em gavas gwasket ar vro muioch evit e kerz ar brezel. Ar Zôzon didrubuilh ha dinec'h a stagañ, eus o zu, pep hini war e dam, vel kilaouen-nou o sunan ; ar roue Edouard a oa laouen, o vean an holl o labourat evit e c'hodel.

Dre benôs e tiwanas en e spered e vije eun dra vat evitan eureuji e verc'h da vab Charles Bleiz ? Poan 'zo o kredi an istor, pa deu da gontan d'imp e oe gret, er mare-ze, divizou etre ar roue zôz ha

Charles, hag e vije heman duk en Breiz hag e vab war e lerc'h, nemet e vije gret dimezi etre an diou diegez, sôz ha breizad. Ha koulskoude, ar wirione eo ; panevert d'eun tól trubarderez, gret d'ar Zôzon gant kevelerien Charles, hep gout doare d'ean, e oa lidet an eured ha klozet, da vat, ar brezel.

C'houitet an tol, an treo a dalc'has da vont a-ruz. Charles, kinniget d'ean gant ar roue Edouard dont a bennadou da Vreiz, a valee dre ar vro, o tastum peadra da brenan e liberte. Teusk e vije e droiou, rak ar laeron zoz, seurt gant Davidson, — mestr kastel Trogoff ha Pestien, — Mantalent, Robert Knolles, Calverly. hag all, na rent ket nemeur a ratouzo.

Dies e oa enebi oute, kement 'vel m'o devoa kemeret o c'hrenv, goude emgannou ar Roc'h ha Mauron. Etouez ar re a stourme, e kaver, 'vit ar wech kentan, er bla 1354, hano Bertram Gwesklen.

Bertram Gwesklen

Bertram Gwesklen an evoa, d'ar mare-man, endro da bevar bla ha tregont, da laret eo, e oa e kreiz e nerz, mar ne oa ket c'hoaz e kreiz e vrud. A-viskoaz e oa bet brezellour ; adalek an oad a seiz vla, pa oa gant e dud en kastel Broon, ne vije ken kavet nemet o redek ar c'hannou. Da seitek vla, e kerz gouelioù eured Charlez Bleiz en Roaon, e tiskoueas e nerz hag e c'halloud, o rei lamm da c'houezek marc'heg, an eil warlerc'h egile. Ne oa nep lec'h pôtr ken têt, ken nerzus nag ive ken dirankon hag hen.

Dre ne oa ket frank e arc'hant, an ije plijadur o pilat ar Zôzon, evit jachan digante ar pezh an ije ezom, armou, kezek, ha peadra da baean ar zoudarded a gase d'e heul.

Etouez an tôliou kaera a reas evelse, eman, da gontan, seiz kastel Fougerai, etre Kastelbriant ha Redon. Ze oa nebeut amzer arôk stourm an Tregont. Ar c'habiten sôz, Bembro, a oa mestr en Fougerai ; eun de ha ne oa ket er gêr, e teuas c'hoant da Wesklen da fountan mestr en e lec'h. Nebeut a dud a oa gontan ; dre ze, e renke c'hoari dre finese. E zoudarded hag hen a 'n em wiskas e stum koataerien, pôtréd ha merc'hed, gante pep a zamm keuneud war o choug, hag a deuas da ginnig o bec'hiou da borjer ar c'hastel. Ar Zôzon a oa dizflus ; koulskoude, pa weljont e oa merc'hed etouez ar vanden goataerien, e sonjont ne oa ket

kalz a riskl, hag int da zigeri an nor. Bertram hag e dud a stlap neuze o c'hoad a-dreuz war an treujou, da harz anei da zerri, hag a lamm er porz 'n eur dennan o armou.

Eur gann tenn a zavas : ar Vretoned na oant nemet tregont, hag ar Zôzon a oa kant ane. Mes Bertram a dalvee dek. Fellout a ra d'ean serri eun toullad eus ar Zozon en eur c'hraou, e koste ar porz ; mes hen e-unan a zo serret ebarz, hag a renk 'n em difenn eneb ar vanden. 'Benn ar fin. torret e gleze, torret eur falz-koad an evoa tapet, 'n eus ken nemet e zaouarn da 'n em gannan. Mad eo d'ean ec'h arru soudarded gall da dremen hag a deu, war an drouz, da rei zikour d'ar Vretoned.

Ar c'hastel a oe kemeret, hag ar Zôzon lazet holl.

Bue Bertram, er mare-ze, zo pen-da-benn eur vue a vrezel. Re hirr e vefe kontan anei war he hed, nemet e kement hag a aparchant ouz hon istor.

*
* *

Ar bla 1356, ar roue zôz, hadstag da vrezelli ouz Frans, a gasas da Vreiz e genderv, an duk a Lankastr, eun den a vrezel brudet bras. Heman a welas kerkent petra oa d'ober : kemer bro Penteur ha kerioù Roaon ha Naoned ; evelse, Bleiziz a renke kouean dindan e zorn.

Charlez Bleiz a oa bepred er prizon. Ar vrud a deuas d'ean e oa ét Lankastr betek toull dor Gwen-gamp ha dornet eno eur rummad Bleiziz.

Gant ar c'hoant bras an evoa da vont da zifenn e bobl pe da gemer lod en e boan, ar prins breton, evit mont ermeaz eus ar prizon, a reas promese da baean seiz kant mil pezh aour d'ar roue Edouard.

Heman a re, evelse, daou dôl gant eur men ;

kargan e gef, ha kas da Vreiz eun enebour da Vontfort hag a lakje skoilhon d'ean war e hent, rak n'houlle ket ar prins sôz, ar c'hurator laer ma oa, e teuje ar minor Montfort da vean re brim mestr war e dra.

Gret e oe pezh etre ar roue hag ar prins Charlez ; mes dre ne oa ket gouest da baeen raktal eur bern ken bras a arc'hant, e oe divizet e chomje e zaou vab, Yan ha Gui, er prizon betek ar baeamant.

Eur wech torret e chaden, ar prins a nijas da Vreiz. En Landreger, herve kont, e tiskennas, ha da Wengamp ec'h eas da gentan, ac'hane da Lambal, ha goude da Naoned. Eno e felle d'ean sevel eun arme da harz ouz Sôzon Lankastr, rak Ar Roc'h ha Lanuon a oa bet goneet gantan.

Mes Lankastr na badas ket pell e dro en bro Treger. Pa glevas an evoc trec'het ar Zozon war roue Frans, en emgann Poitiers, sodet gant al lorc'h, e redas da lakat seziz war Roaon. An 3 a viz here 1356, e oe kelc'hiet kêr.

Ne oa ket nemeur a zoudarded enni, mes tud vata oant, ha Bertram Gwesklen na oa ket ive a-bell. Epad ma heskine Bertram ar Zozon, a-ziavez kêr, Bleiziz a stourme eus o gwellan, a-ziabarz. Ha gant-ze, pa fellas d'an enebourien toullan dindan ar magoriou, Bleiziz a lakas dre holl pilligou arm, hag ar strons ane a roas da c'hoût pelec'h e oad o pigellat. Herve kont, eo en iliz Sant-Salver, e kichen skeuden an Itron-Varia ar Miraklou, e oe tapet ar roud ane ; lazet e oent holl ha stouvet warne.

Lankastr a glaskas neuze eun dro-all. Dre ma ouie e oa nebeut a voed en kêr, hag hen o tigas moc'h, pevar mil en eur vanden, war hed tol d'ar magoriou, e zonz e teuje Bleiziz da zigeri o dor, evit ésat kregi warne. Gret awalc'h o dije, pane-

vert Penhouet, kabiten kêr, a 'n em gemeras 'n eur stum-all. Ober 'reas stagan eur wiz, heli he zreid, e lein an nor. Ar wiz da skrinjal ; kerkent ar moc'h da ziredek. Pa oent arru holl ouz toull an nor, e oe digoret d'é gant prez ; ar wiz a oe distaget ha jachet a stlej-kaer a dreuz d'ar ruiou. Moc'h ar Zozon a deuas holl warlerc'h. Ar Zozon, avat, a chomas ermeaz, o fri war ar gleud.

Koulskoude, ar c'hig moc'h a zivias, ha kêr na oa ket bepred zikouret, daoust da Charlez Bleiz da vean gret sevel eun arme. Eul loden eus an arme-ze a oe distrujet gant Lankastr, dirak kêr, hag al loden-all a oe darbet d'ei ive bean kemeret gant kêr Dinam war ar marc'had.

Roaôniz a ijinas adarre eun tól finese. Unan ane a 'n em lezas da vean tapet gant soudarded Lankastr, hag a gontas d'e e oa tec'het eus kêr, abalamour d'an dismegansou a oa bet gret d'ean. « Ha neuze, emean, dare e oan da vervel gant an naon, N'eus ken a voed ; plegan a vo red, nemet hag arruout a rafe fenoz, evel ma zo lavaret, eun arme a bevar mil den...

— Eus a be tu, eme ar Sôzon ?

— Eus tu Frans, eme an den-man. Mar karet, emean, me gaso ac'hanoc'h d'arbenn hent d'ei ! »

Ar Zôzon, touellet, a lezas kêr he-unan. Pa diz-rojont an de warlerc'h, gret gante eun dro wenn, o c'hamp a oa dêvet, o boed laeret, ha Gwesklen a oa en Roaôn.

Meur a grog a oe c'hoaz etre Sôzon ha Bleiziz.

Dre urz ar roue Edouard eo ec'h achuas ar brezel. Eur marc'had a oe divizet : Roaôniz a zigoras o dorjou da Lankastr, amzer da zont en kêr ha da vont ermeaz, hag a baeas d'ean ugent mil-skoed, ha kêr a oe laket, kerkent goude, etre daouarn

Beaumanoir. Kement-se a c'hoarvezas wardro d'ar 5 a viz gouere 1357.

Eur chans kaer a oa, pa ne oa ket bet kemeret kêr-benn Breiz. Dre ze, he difennourien, ha dreist-oll, Gwesklen, a oe gret kalz a stad ane dre Vreiz ha dre Frans. Gwesklen a oe kaset e hano da bevar c'horn ar Vro; mab roue roue Frans a ginnigas d'ean dek mil lur leve, ha Charlez Bleiz hen lakas da vestr war gêr ar Roc'h ha war he douarou.

Kredabl eo ec'h eas ar mare-ze an duk Charlez d'ober ar pelerinaj an evoa prometet da zant Erwan, goude emgann Ar Roc'h. Eus ar Mêzou da Landreger, e reas an hent diarc'hen, e kreiz ar goanv, war an erc'h hag ar skorn. An dud a ouele hag a dôle plouz ha dilhad dindan e dreid. Mes hen a glaske bepred ad tu diêsan eus an hent. Pan arruas en Landreger, ne oa ken evit chom en e zav, hag epad tri miz e vanas hep gallout kerzet, kouet ar c'hroc'hen ziwar plantou e dreid.

*
*
*

Warlerc'h reuz Lankastr, a teuas diou vlavez peuc'h. Charlez Bleiz a implias an amzer-ze da gestal arc'hant evit paeen e c'hle d'ar roue soz. Heman, e keit-ze, a lake e gêriou hag e gestel ari-graf etre e gabitened, da c'hoût piou a dôlje ar muian warne.

Evelse e karge eus an daou du. Ar prins Charlez a gasas d'ean, etre diou wech, kant mil pez aour. Paour kez prins ! Eun drue e oa gwelet anean, o vont, a gêr da gêr, red d'ean samman e dud 'vit 'n em dizamman e unan ! Ar maro a yee 'n e galon, pa renke skei war dor an dud kez, bet gwadet dija ken lies a wech gant dorn didrue ar Zôzon.

Ha goude kement a boan da dastum arc'hant 'vit e enebour, e renkas koll c'hoaz eul loden vras ane ; kant mil pez aour a oe lonket d'ean 'n eur wech, gant ar mor. Pa c'hoarveze gantan gwal doliou evelse, ar prins santel a lavare : « Bolante Doue da vo meulet en pep tra ! »

En miz even 1359, e hadkrogas ar brezel, 'vit padout betek miz mae 1360. Heman a oe brezel-bihan, renet dreist oll gant Gwesklen, tro ha tro en Breiz-Izel hag en Breiz-Uhel. Ar vro a deue da vean dizeblant, ken gwan ha ken fêz 'vel ma oa rentet ; an holl nerz a chome ganti a lake da huanadi warlerc'h ar peuc'h.

En miz mae 1360, pa oe sinet emgleo, etre Frans ha Bro-Zoz, en Bretigni, e oe mouget ive, 'vit eur pennad, ar brezel en Breiz. Daou vla a oe laket neuze d'an diou gosteen, Bleiz ha Montfort, da 'n em glevet, da vat. An daou roue a dlee rei d'e skoazel evit terri o enebiez hag ober eun emgleo padus. Ter vodadeg a oe gret, abeurs ar Pab hag abeurs ar rouane. Hini ane na dalvezas da netra. Bolante eur plac'h, krenvoc'h 'vit hini ar Pab, ar brinsed hag ar varc'heien, a drec'has war ar peuc'h ; ar plac'h-ze a oa Jann Penteür, pried Charlez Bleiz. Vit difenn he gwir, n'he devoa souzet, betek hen, dirak labour na poan ebet. Gwelet he devoa he fried hanter-lazet ha prizoniet, he bugale diframmet diganti, he zud hag he douarou laeret ha drastet, eur zamm pounner a c'hle tennet war he madou ; n'eus forz, dreist da gollou ha glac'har, e lake he gwir, he gwir a dukez a Vreiz ; hag ar c'hleze en he dorn a chomas peget, 'c'han ma teuas Doue, dre drue ouz Breiz, da laret e c'hir, ar gir diwean.

Pederved loden ar Brezel

(1362-1364)

Gwesklen en Breiz : seziz Pestien ha Trogoff. —
Emgann Alre. — Maro Charlez Bleiz. —
Montfort duk a Vreiz.

Herve ar pezh a oa bet sinet etre Frans ha Bro-Zoz en Bretigni, an daou roue na dleent ken 'n em veskan 'barz treo Breiz, goude ar 7 a viz gouere 1362; gwaz evite mar n'o dije ket gallet, 'benn neuze, unani Bleiz ha Montfort.

Manet ar peuc'h ouz an drez, ar roue Edouard a 'n em gavas nec'het. Red e oa d'ean loskât Montfort da vale, pe lezel e enebour da bignal war trôn Breiz. Hogen, rei e frankiz da Vontfort a oa ivelakât etre e zaouarn ar madou bras a oa rikouret Bro-Zoz gante, aboue keit amzer. Mes ouz ar red, n'eus ket a remed. Ar roue tager, forz pegement e kouste d'e yalc'h ha d'e galon, a renke rei e dreo d'ar c'hont yaouank; n'her greas ket, avat, hep kalz a zivizou.

Ar prins na oa ket dizro mat da Vreiz, ma welas ne oa ket c'hoaz e vestr. 'Rôk ober brezel, a renke kât soudarded, hag eus a belec'h kât, nemet eus a Vro-Zoz ?

Mes Montfort n'houlle ken kouean dindan pao ar roue skrapet. Gwellan 'n evoa d'ober oa c'hoaz 'n em glevet gant Charlez Bleiz, ha goulenn digantan rannan an dukaj etreze o-daou. Ar prins Charlez a oa eun den santel; stad truezus ar vro a vantage e galon; o kinnig d'ean ar peuc'h hep brezel, e oar sur da vean chilaouet.

Chilaouet e vije bet Montfort, mar ne vije ket bet 'n em gavet, etreze ha Bleiz, bolante an du-kez Jann. Ouz ar roc'h-ze, mennoziou seurt-gant hini Montfort a renke bean bruzunet.

Evit gwir, an tu krenv, hag a-bell, a zeblante ive bean breman gant kosteen Bleiz. Ar roue zoz n'halle ken rei e skoazel da Vontfort; Bleiz, er c'hontrol, a wele souden o tireded da harpan e gêz, eun niver a gerent hag a vignoned dilabour aboue ma oa kloz ar brezel en Frans. Herve kreden an noblansou bleizek, ne oa bet biskoaz krenvoc'h tu ar prins Charlez. Ne oa bet biskoaz ken krenv, zoken, rak Gwesklen, ar brezellour didrec'hus, a oa prest da lakat en he zervij e skiant hag e nerz-kalon.

Ar brezel a strakas an deioù kentan eus ar bla 1363. Gwesklen a oa en penn arme Bleiz. Ken boaz vel ma oa da vrezelli en pep korn a Vreiz, na chomas ket pell d'ober e zonz. War gastel Becherel e oa e zell. Hennez, gant ar Zoz a oa ennan, Latimer, a re ar muian a c'haou ouz Bleiziz war bouez ugent leo dro. Kastel Roc'h-an-Ezen, war ribl stêr ar Rance, a drubuilhe ane ive: an daou-ze a oa da ziskarr.

Mes Bertram n'eas ket d'e a-benn kaer; er c'hontrol, trei a reas diwarne ha skei pelloc'h, 'vel pa vije o vont da Vrest.

Arru en bro Wengamp, e koueas, 'vel eur c'huc'h

run, war Zozon Pestien ha Trogoff, ha skarzan ar vro dioute. (1) Keraez ha Kastel-Pol a deuas gantan d'o zro ; ète vije pelloc'h, panevert e klevas e oa kemeret kastel Roc'h-an-Ezen gant e letanant Vaucouleur, hag e oa Montfort o tont d'ar red trezek Bro Leon. Raktal Gwesklen a droas, evel an avel, a du. Dizrei a ra war e giz da Vreiz-Uhel, ha setu hen dirak Becherel. Ar Zozon a grene ; paket e oant, a dra zur... Hogen en Frans, e oa ezom ive eus Bertram ; galvet e oe da vont d'an Normandi.

Siouaz, dal ma tec'has, Charlez Bleiz, lezet e-unan, a chomas kement da dermal, ma roasamzer da Vontfort da dostât, ha setu n'hallas ket kemer ar c'hastel. Mes Montfort na oa ket ive 'vit skei gant Bleiziz, hep noazout ouz Sôzon Becherel ; laket e oe eta eun de gant an diou gosteen da 'n em gât, war lanneier Evran, evit ober eno eur c'hrog. Mes pa oant o vont da stagan, eskibien a digoueas o c'hervel d'ar peuc'h an daou enebour.

Adarre, oe gret divizou da rannan Breiz etre diou loden, Naoned, Gwened ha Kemper da Vontfont, ar peurest da Vreiz. Montfort a asantas :

(1) Ar c'hestel a oe dispennet. Tud Treger ha Kerne a oe ken evurus o vean dizammet eus ar Zôzon milliget, ma rejont diou zôn d'ar mestr-brezel Gwesklen, o zalver. O-diou emaeant en *Barzas-Breiz* an O. Kermarker ; an hini gentan, *Filhorez Gwesklen*, a oe zavet diwarben dismantr kastel Trogoff ; an eil *Gwaz*, an O. *Gwesklen*, diwarben seziz kastel Pestien.

Ennan zo pôrtred hag a wask tud ar Vro,
Hag a laka trubuilh ousoen seiz leo wardro.

Mes :

Gwesklen 'n eus lavaret : « M'hen toue sent a Vreiz !
Tra vezc beo eur Zôz, ne vezo peuc'h na reiz !

Bleiz a zinac'has. Mab roue Bro-Zoz a glaskas c'hoaz unani an diou gosteen en Poitiers ; pean gollet. Ne oa ken nemet rei bec'h d'ar c'hleze.

*
* *

Ar prins Charlez a oa klanv en Gwengamp, pa glevas lavaret, tro fin miz gouere 1364, an evoa hadsavet Montfort e arme, an evoa kemeret kestel Sucinio hag ar Roc'h-Periou, hag e oa digoueet dirak kêr Alre, gant listri ha soudarded.

Bleiz a c'halvas e dud endro d'ean hag a gwi-taas Gwengamp, kentan m'hallas, evit mont da Joselin, tostoc'h d'Alre. 'Benn an deiou diwean a viz gwengolo, an evoa dastumet eno pevar mil a zoudarded hag a varc'heien, Gwesklen unan ane. Montfort an evoa tost da gement-all, ha gantan e oa Chandos, ar gwellan brezellour a oa en Bro-Zôz.

E oa Bleiziz o tanzen kuitât Joselin, pa digoueas eur c'hannad abeurs Montfort. Eur wech c'hoaz, heman a ginnige ar peuc'h, gant ma vije rannet Breiz etre an diou gosteen. A-boan mar oe lezet ar c'hannad da gomz, kement a droug 'vel ma savas 'barz an dukez hag ar baroned. Kaset e oe en e dro gant komzou dismegansus, ha touet d'ean e vije kannet Montfort, dindan pevar de, mar vije c'hoaz dirak kêr Alre.

An 28 a viz gwengolo, 'benn noz, arme Bleiz, èt dre Geranna, (hirie Santez-Anna-Wened) a 'n gavas en tu kle da stêr al Loch, ez-eün d'ar Char-treuz ; arme Montfort a oa en tu-all. Heman a gasas adarre eur c'hannad evit kinnig eun emgleo ; ne oe gret van ebet outan.

An 29 a oa eur zul. Beure mat, Bleiziz a dreuzas

ar stêr hag a bignas war dosen ar Chartreuz, o lezel o c'hezek e-traou, ar re ane o devoa. Ar Zôzon ive a oa holl war droad. Pan em gavas an diou arme pen-ouñ-penn, arôk diwinan ar c'hleze, e oe sonjet adarre 'barz ar peuc'h. Ar Zôzon a c'houlennas neuze, evit o lod, ma vijent lezet c'hoaz, epad pemp bla, da zewel truajou war Vreiz. Ar prins Charlez a respontas penos, kentoc'h vit zinan eur peuc'h ken traitour evit e bobl, e oa gwell gantan goulenn d'hen zikour Doue hag e gleze.

Ar c'homzou-man, strinket birvidik eus e galon, eo, koulz laret, an diwean komzou a rann, eus ar re zo merket, da vihanan, war levr an istor.

Goude ze, ne glever ken a gomzou, nemet trouz ha safar an emgann, ar youc'h hag ar yud dre draouien al Loch betek Alre.

An trec'h a yeas, da gentan, gant Charlez Bleiz; Montfort a vennas, zoken, kemer an tec'h, mes e vignoned soz, Chandos ha Kalverly, agavas an tu da bakan Bleiziz etre daou dân, hag adalek neuze ar re-man a oe koll.

Gwesklen ha Charlez Bleiz a harzas ar pellan, gant eur bagad mignoned endro d'e Hogen, ar beure e oa bet divizet, gant tri marc'heg eus a du Montfort, e lazjent ar prins Charlez, mar vije paket gante; Bleiziz o devoa 'n em glevet memes tra diwarben Montfort, kement hag ober eur fin bennak d'ar brezel. Gant ze, kentan enebour a hallas, a skoas Bleiz d'ar maro. Kouean reas war e fas d'an douar; eur manac'h, Breur Rabin, eus Naoned, a dostaas outan, 'n eur c'hervel Doue d'ê zikour. Ar prins n'hallas nemet lavaret: « Ha, Otro Doue! » ha kerkent e tremenas (1).

(1) Eur groaz a zo bet savet elec'h ma oe lazet Charlez Bleiz.

Gwesklen, henvel ouz eul leon, a dalc'he bepred da skei, daoust d'ar Zozon da vean dastumet holl war e dro. Pa welas an duk o kouean, an dizesper a yeas en e galon.

— « Allas! emean, maro eo kalonekan den a oa war ar bed! Ne brizan ken ma bue daou wenneg! Gwell eo ganin mervel ive! »

Pa ne chomas ken en e zorn nemet eur pennad kleze kammet ha gwiet, neuze en em rentas. Bleiziz o devoa, 'benn neuze, tost da dri mil a dud maro ha prizonier.

Montfort a reas klask korf Charlez Bleiz etouez ar c'horfou astennet war an dachen; pa oe kavet, ec'h eas d'hen gwelet, hag en em lakas da ouelan.

« Doue a oar, emean, otro Charlez, nag a geun am eus d'ho kwelet evelse, pa hallemp bean 'n em welet 'n eur stum-all! »

Ober a reas sevel ar c'horf ha dougen anean da Wengamp, evit bean douaret en kouent ar Gapusuned, e kichen be Gui a Vreiz, e dad-kaer.

Mar oa maro Charlez Bleiz, e gosteen, daoust d'ar c'hollou he devoa gret, a oa c'hoaz beo-buek Koulskoude, ne zonjas ket brezelli pelloc'h. An dukez Jann, breman kontez ha netra ken, a blegas dindan an tol, 'vel pa vije deut abeurs Doue.

Breiz, evit gwir, na oa ken a wad en he gwaziou 'vit gouzanv eur brezel-all, ha Jann a Benteür, mar oa bet kalet awalc'h evit derc'hel da zifenn he gwir betek maro he fried, a oa gwriennet re dôn en he c'hreiz karante Breiz, evit derc'hel d'he gwir betek maro he Bro.

Pa oe sinet ar peuc'h en Gerand, an 12 a viz ebrel 1365, ec'h eas da chom da Wengamp. Eno e renas, epad ugent vla, eur vue karget a vertuioù hag a oberou mat, etre ar sonj eus he fried maro

hag ar sonjeus he bugale serret bepred en prizoniou Bro-Zôz. N'hallas ket gwelet ane en he beo. Da vihanan, gwelet a reas santelez he fried o par-
ran 'vel an heol, hag eur bobl a dud o tont d'e ve
da c'houlouen miraklou.

Hi hec'h-unan a reas c'hoaz ive, arôk mervel,
eur burzud a garante-Vro. Pa lakas en e benn roue
Frans esât distrujan frankiz Breiz, e oe gwelet
Jann, kontez Penteur, pried Charlez Bleiz ha mam
prizonierien Bro-Zoz, o vont, ar gentan, da zaludi
Montfort evel duk a Vreiz, ha da ginnig d'ean he
holl skoazel eneb d'an estranjour...



TREDE PENNAD

Vertuioù ha mirakloù

Charlez Bleiz

N'eus ket bet roet da Charlez Bleiz nemeur a
veulodi kaeroc'h evit an hini a roas d'ean Bertram
Gwesklen, war dachen Alre : « Maro eo, emean,
kalonekan den a oa war ar bed ! » Meulodi eur
zant gret gant eun den a vrezel.

Souezet e ver, marteze, o klevet pegement a stad
a re eun den 'vel Gwesklen eus Charlez Bleiz, eur
« manac'h, » eun « ermit, » 'vel ma vije gret anean,
alies, dre waperez. N'eus netra souezus war ze.
Bertram Gwesklen, brezellour ha marc'heg dis-
par, an evoa kavet 'barz en Charlez Bleiz, 'vel
marc'heg hag evel den, unan trec'h d'ean. Hep dis-
klierian dre benôs e oa ar prins savet ken uhel,
anzav a re n'evoa ket e bar, betek ma oa prest e

unan da vervel war e lerc'h, 'vel pa ne vije ken war an douar, 'vit eur marc'heg, mezellour ebet din da baran warnean an daoulagad. Kement-man a ziskouel, eur wech ouspen, penôs ar relijion na disparti ket ar c'hristen nag ar zant diouz an dud-all, nag ober gantan eun den ha na oar ket bevan.

Er c'hontrol eo ; ha Charlez Bleiz an ije gallet respont d'ar baroned ha d'an noblans a gave si awechou en e zevesionou : « Markaveteo brao bevan 'n em c'hichen, hag en em c'hompagnunez, ne damallet ket d'in ma devosionou ; rak eno eman ar vammen eus ar pezh a vad a gavet ennon. » Mar oa ar prins Charlez eun den ar c'halonekan, eo dre ma oa eun den ar zantelan. An dudi a gave an dud en e zarempred, na oa nemet ar skeud eus a zantelez e ine ; mar vije habask ha sioul e kreiz ar gwasan reuz hag ar brasan trubuilhou, eo dre ma oa sioul e ziabarz.

E ine a oa en eur stad ha n'e ket anaveet 'barz ar bed, p'eo gwir kent 'n em gât er stad-ze, eo red bean « trec'het ar bed ». An dud, nemet hag a-heurtet a vefent, a blij d'e awalc'h tanva ar freuz dudius eus ar zantelez ; plijout a ra d'e kât d'ober gant eun den dous ha karantezus, diflach e kreiz an trubuilhou hag ar chanchamanchou ; mes spontan, heuzi a reont dirak ar wrien a vag ar freuz saourek-ze. N'houllont ket anzav eo e kreiz ar binijen ve savet ar flouran hag ar c'haeran vertioui.

Charlez Bleiz an evoa hadet, a blijadur kaer, drez ha spern ar pinijennou en liorz e ine ; setu perak e strinke diouti kement a c'houez vat ; war ar spern e oa diwanet roz.

Mes nag a labour evit o zevel hag o miret

dinam ! E kichen bue zoudard Charlez Bleiz, hag a zo enni peadra da gargan chouk holl deveziou eun den, zo eur vue-all, e vue manac'h, stankoc'h c'hoaz an oberou enni evit en eben. Penôs e c'hallas ar memes den pedi ha brezelli kement war an dro ? Eur burzud eo. Hag ahendall, penôs e c'hallas eun den a beuc'h evel ma oa Charlez, bevan, 'pad e vue, 'kreiz an tân hag ar gwad, betek mervel war an dachen vrezel ? Eur burzud-all ; o-daou int gret dre an hevelep vertu : Charlez Bleiz, evel ma lavar an Iliz en e ofis, a oa holl gwestlet da Zoue.

An den a 'n em dol eus lein eun tour a ra an dilez eus e vue ; ar prins-man, adalek e yaouankiz, an evoa gret ive an dilez eus kement an evoa ; eus lein an tour elec'h ma'oa savet uhel, tour gret gant madou, noblans, kened, nerz, spered, gouiziegezh, an evoa 'n em dolet etre diouvrec'h ar C'hrouer.

Goude ze, e vrasan evez a oa da 'n em derc'hel 'barz ar stad-ze a zoujans hag a zentidigez.

Setu eno perak e viras hag e kreskas devosionou e yaouankiz. Bep beure, e lavare ar brevier gant unan eus ar veleien a vije bepred ouz e heul, hag etre pep loden, ar *Salve Regina* ; pa deue gantan ar gir « mam », ne vije ket 'vit harz d'hen adlaret ter gwech, gant kement a garante, ma teue e dremm da chanch liou ha ma seblante e spered bean ét digantan. Ouspen, e lavare c'hoaz ofis ar Wer-c'hez, hini ar Spered-Santel, ar Groaz hag an Anaon. An hanter brasan eus an noz a lake ive da bedi war e zaoulin.

Bep beure ha bep noz e kovesae, ken piz vel ma oa warnean e-unan ha ken lemm vel a oa lagad e gonsians, ha bep miz ha d'ar gouelioù, e komunie.

Bep beure e kleve diou oferen, awechou peder

ha pemp, hag e gador, pa zave diwarni, a vije glebiet gant e zaerou. Gwell a oa gantan koll eur c'hastel pe eur gêr, eget koll eun oferen, rak eur gêr, emean, e c'honeje anei adarre, gant zikour Doue, hag eun oferen, eur wech lavaret, n'he c'havje ken.

'Vit kastizan e gorf, e yune, an deiou merket gant lezen an Iliz, hag, ouspen, daou devez ar zun ha derc'hent goueliou ar Werc'hez. E vedisined hag e vevelien a renke alies gourdrouz anean, abalamour d'e yuniou ; awechou, ne deue ket d'e bred, hag awechou, pa vije ouz tol, ne debre ket : « Ah ! Olier, e lavare d'e vevel, me ne ran vad ebet, ne gemeran poan ebet, ha mar tebrfen, ma zechou fall a dree'hfe warnon !

Dougen a re, dindan e zilhad, eur gouriz kalet stardet gant kerdenn skoulmet ha houarnet, hag a droc'he e gorf. Keit ma oa er prizon, daoust d'ean da vean bourevet awalc'h, an evoa, 'vit 'n em gastizan, eur skourje lâr houarnet. Ar Zozon a gavas anean eur gwener, ar skourje-ze en e zorn hag e gorf goloet a wad ; o fedi a reas da devel war ar pezh o devoa gwelet.

Eun den evelse a ve bepred o klask an tu d'ober gaou ouz e gorf, 'vel ma ve an dud-all o klask plijadur. Mont a re betek lakat mein munut en e votou, 'vit kreski e ziézanant.

An holl boaniou-ze a ginnige da Zoue, evel digoll, pan halle ket serviji anean 'barz ar stad a vanac'h. Karet an ije bean bet kapusun pe chartreuz, mes c'hoaz e kare muioc'h ober bolante Doue.

E c'hira oa, pa digouee gantan eur gwall dro pe eur gwall gelo bennak : « Ra vezo meulet Doue en pep tra ! » Hogen, n'e ket keleier trista vankas d'ean epad e vue : kerent maro, soudarded tre-

c'het, arc'hant kollet, sujidi gwasket, an eil seurt tra pe egile a deue, a greiz holl, da vantran e galon. Ne vije ket gwasoc'h droug ennan eneb d'e enebourien : « Ar re-ze, emean, a gred d'e ive eman ar wirione gante. »

Pa vije en hent, e tiskenne bepred da zaludi an ilizou, ha da bedi Doue hag ar zant patron ; dirak ar berejou, e lavare an *De profundis* ; hag ar beden *Ne Recorderis*, pa gave eun iliz 'lec'h ma vije beziet unan bennak eus vignoned. Ken alies e tigouee an dra-ze, ma teskas e dud ar beden dre envor, ha ma rent fent gante o-unan ha gant an duk : « Heman, eme, a dleje bean manac'h en eur gouent. »

Ne welent ket pegen kaer tra oa d'eun den, goude bevan evel eur manac'h, brezelli evel eur marc'heg ha gouarn evel eur prins.

Ar pezh a brize ar muian en e garg a duk a oa barn, dispartian ar gwir diouz argaou. 'Vit bean suroc'h d'ober lealded da bep hini, e klaske, war e dro, an dud ar muian anaoudek war kiziou ha lezennou ar vro, evel Rolland Felipe, an hini a harzas da vont da vanac'h 'vit derc'hel anean en e gichen. Eur c'hiz a oa, koulskoude, ha n'hallas ket he digemer, kiz an « duel. » Ar varnedigez a oa d'an duk, emean, ha nan d'ar c'hleze.

An ér vad a douge, ha teneridigez e galon a re karout anean c'hoaz, e tu-hont d'e lealded.

Dreist da vantel ar prins, e oa, war e choug, mantel ar c'hristen hag an tad. Pa ne grede ket an dud dister tostât outan, hen a yee d'o c'hât, hag en em ziskouee gante evel pa vije bet eus o renk.

Ne gomze dre de ouz den ebet ; ne deue den d'hen zaludi, ar paouran, zoken, hep ne respontje d'ean kerkent, e dog en e zorn.

Mar 'nije renet en Breiz, 'n eun amzer muioc'h sioul, e vije bet douget gant ar bobl.

E-touez ar bobl, ar beorien a denne, da gentan, e c'hrasou mat abalamour d'o faourante. Ne ouie petra d'ober evite. Miret d'e ar pep gwellan eus e brejou, diouered arc'hant bras da zevel hospitaliou d'e en Gwengamp hag en Naoned, serviji ane ouz töl, betek triugent war an dro epad holl deveziou ar c'hoareiz, gwalc'hi d'e o zreid de ar Yaou-Gamblid, rei d'e e zilhad diwar e gein, kant ha kant stumm an evoa da ziskouel d'e e garante.

Eun dra hag a oa d'ean c'hoaz a oa rei prof d'an ilizou. Dies a vefe niveri an arc'hant hag an treo talvoudus a lakas endro da ilizou Breiz. En Sant-Brieg, en Naoned, en Roaön, en Lambal, en Dinam, en Gwengamp, er c'hêriou-ze dreist oll, e oe gwelet labouriou gret diwar e zorn, donêzonou roet gan-
jan, evel gwer livet, dilhad oferen, kroaziou arc'hant, ha kant ha kant tra, herve ezommou an iliz hag e zevosion.

An doujans an evoa 'vit treo an Iliz a re d'ean renti ive kalz a enor d'an dud gwestlet da Zoue, d'ar veleien, da gentan. Ne oa ket dibôt gwelet anean o tisken diwar varc'h, pa gave war e hent eur beleg bennak. Ne dôle gwech ebet e droad arôk hini eun eskob. 'Vit an dud a iliz 'vel 'vit an ilizou hag ar beorien, e oa bepred frank digor e galon hag e yalc'h. D'ar re a glemme o welet e zispignou, e lavare ; « N'ho pet ket aon, Doue hon digollo » ; peotramant : « Touet am eus zikour an Iliz, ne ran nemet ma dêver. »

*
*
*

Vertuiou Charlez Bleiz a 'n em ziskoueas goude e varo splannoc'h c'hoaz 'vit epad e vue. A-boan ma oa diskennet e gorf er be, e teuseur bobl endro d'ean da bedi ; rak, daoust d'ar brezel, ar brud eus e

zantelez a oa êt a-bell bro. Ar re a oa bet an tostan d'ean, en e vue, a deuas da gentan, da glask e skoazel : marc'heien, evel Beaumanoir, Gwilherm Anseau, gouarnour Gwengamp, e vevelien ha tud e di, evel Alan Raoul, e aluzenner, Erwan Crenan, Olier Sellier, ha kalz a re-all. Ne dalejont ket da vrudan ar grasou o devoa bet, ar miraklou gret en o c'henver, ha setu, a-benn tri bla goude maro an duk, e oa deut iliz Kapusuned Gwengamp da vean eul lec'h a bêlerinaj eus ar c'haeran.

Tud a direde di eus ar broiou tro-dro da Vreiz, ha betek eus an tu-all da Bariz. Be ar prins a oa goloet a desteniou a bep seurt, daoulagad, diou-vrec'h, diouhar gret gant koar, tier, listri, tölennou, skridou digaset eno gant tud bet pareet, ha darn, zoken, gant tud bet savet a varo da veo. Ar bobl a hanvas « *Douar Santel* » ar c'horn douar elec'h ma oa ar be burzudus. Koulz a oe, etre ar blavezioù 1366 ha 1371, Gwengamp a jachas kement a dud evel S. Erwan Landreger, elec'h ma c'hoarveze ive, er mare-ze, eleiz a viraklou.

Kement-all a drouz endro da Charlez Bleiz maro a re drouk-kalon d'an duk neve, Yan a Vontfort. Kement burzud a re an duk santel a zeblante d'ean ken lies a zismegans, ken e teuas aon d'ean da goll e gurunen. A dra zur, Charlez Bleiz an evoa neuze kaeroc'h kurunen ha kaeroc'h trôn vit hini Breiz-Izel ; n'eus forz, bopred an duk Yan IV na oa ket êzet e spered. Setu er bla 1368, e c'hoarvezas, en iliz-kapusuned Dinam, eur burzud neve hag a reas d'ean kounnari. Eur pennadig arôk e varo, ar prins Charlez an evoa gret livan, war vagon an iliz-ze, eur ween, elec'h ma oa skeudennet bue Sant Fransez Asiz ; ouz troad ar ween, an evoa gret ober e boltred hen, war e zaoulin, ha gantan eur gwiska

mant herminiget, evel duk a Vreiz. Montfort, o vean deut da Zinam, a welas ar poltred, hag a lavaras e oa red diverkan anean. Sentet e oe outan ha laket eur gwisk livaj gwenn war boltred an duk Charlez. Hogen, de ouel ar Nerc'hez, an 8 a viz c'houverer, ar poltred a 'n em lakas da wadan, dre gichen skouarn an duk, elec'h ma oa bet tizet, de e varo. Tud o tiredek, ouspen daou vil, d'an iliz. Sôzon a oa en o mesk, hag a zifenne n'e ket gwad a skuilhe ar skeuden. Daou ane a bignas 'n eur skeul da skei tôliou kontel ganti. Eur Breton, Javre Budes, a bignas ive hag a zastumas eun daken wad war e viz. An duk Yan, droug bras ennan, a roas urz d'ar venec'h da diverkan ar skeuden pen-da-ben ; mes eskob Sant-Malo a laras n'ober ket, hag outan e oe sentet.

Montfort, kaer an evoa, na oa ket eta evit harz ar burzudou. Pez a harzas, avat, a oe hanvan Charlez Bleiz sant.

Ken pell e oa ét ar vrud eus an duk madoberus, betek al Lorên hag ar Perigord, ken enoret e oa gant ar bobl, a zave dija ôteriou war e hano, ken e teuas kalz a noblans hag a dud a iliz koulz a Frans 'vel a Vreiz, da c'houlen ma vije grêt enklask diwarben e zantelez. An O. Erwan Begaignon, eskob Landreger, a yeas da gât Urban V, da Avignon ; ar Pab a roas ôtre. N'e ket en Breiz, avat, e oe gallet ober al labour ; an duk a Anjou, mab-kaer Charlez Bleiz, a renkas rei digemer d'an testiou ha d'ar veleien : ouz ar re-man, dorojou Breiz a oa serret dre urz an duk Yan. — Daoust d'an enebiez-ze, e oe dalc'het gant an enklask epad tri miz.

An 18 a viz here 1371, e oa achuet. Daou-c'hant a dud a oa bet o renti testeni da zantelez ar prins

Charlez ha daou-c'hant mirakl a oa bet studiet hag anaveet e oant gwir.

Ar Pab a oa eta o vont d'unani e vouez gant hini ar bobl, pa strakas eur brezel etre Frans ha Bro-Zoz, hag a lakas duk Breiz a-du gant ar Zozon. Ar Pab a davas neuze, o kredi ne oa ket ar c'houlz da zisklerian santelez Charlez Bleiz. Hogen, goude ze, e tigoueas an darvoud hanvet en istor « schisme d'Occident, » eur skoilh adarre, rak n'em gaout a reas e oa kerent an duk breton etouez ar re a enebe ouz ar wirione. Diwar ar wech-ze, Charlez Bleiz a oe ankouaet da vat.

Ar bobl, koulskoude, a chomas feal d'ean hag a zalc'has d'e enori e kerz ar c'hantvejou. Pa oe kemeret Gwengamp er bla 1591, gant ar prins a Domb, letanant Henri IV, ha distrujet ilizou ha kouenchou, ar Gapusuned a gasas gante relegou Charlez Bleiz hag a dec'has da C'hras, elec'h m'o devoa eun eil kouët.

Er bla 1756, ar relegou a oe laket en eur vouest kinniget gant an duk a Châtillon, eus an hevelep tiegez gant an duk santel. Eur goul a vije gret bep bla, en e enor, gant ar Gapusuned, ha heuilhet gant daou vil bennak a belerined, a deue da govez ha da gomunian.

Siouaz, gant an Dispac'h e oe chaseet ar venec'h. Ar relegou, da vihanan, a oe sovetaet. Pa oe adsaveet parous Gras, goude emgleo ar Pab ha Bonapart, ar relegou-ze a oe roet d'an otro person ; aboue int bet miret eno.

Pa ne oa ket deut a-benn falc'h an amzer ha kounnar an dispac'herien da distrujan an envor eus Charlez Bleiz, eun dic'haou a oa dleet d'ean,

forz pegen divezat e vije da 'n em gât gantan. Er bla 1890, breman zo ugent vla, eskopti Bleiz (Blois) a zavas gant ar c'hoant da enori an hini e touge e hano. Pevarzek vla goude, ar 14 a viz kerdu 1904, an Tad santel Pi X a lake Charlez etouez servijerien Doue diskleriet eyurus.

Eur gouel kaer, hag a badas tri de, a oe gret en Blois, pa digouegas ar c'helo-ze.

Kêr Wengamp, eskopti Sant-Brieg, Breiz-abez a zav breman, d'o zro, 'vit saludi, war e dron lugernus, o duk santel kurunet gant Doue ha gantan Iliz.

Gwellan zonz o deus bet eo unani e ouel gant hini an Itron-Varia-Wir-Zikour. Gwengamp ! An Itron-Varia ! An daou hano-ze a lak da dridal kalon Charlez Bleiz, e lein ar baradoz..... Pa welo e relegou zakr o tont trezek kêr Wengamp, douget dre ar ruiou pleustret gantan gwechall, pa dremenfont e kichen an douar 'lec'h int bet pell o repoz ; dreist oll, pa digoro dirake dorjou an iliz goz elec'h ma pedas ken alies, ha pa 'n em gavfont dirak Gwer-c'hez ar porched hadnevaet d'ei he c'hurunen, neuze levez an duk santel a vo bar. Neuze en em droo ouz Doue, ouz e Vamm, ouz an holl Zent hag an holl Vretoned a zo en nenv, hag e pedo ane da unani o galloud gant e hini evit skuilh war Vreiz eur mor a c'hrasou hag a vennoziou. Ni, war an douar, a unano ive hon moueziou gant e hini, hag a lavaro gant an Iliz, en e ofis :

« Doue, hag ho peus roet d'ho kovezour, an den Evurus Charlez, eun nerz souezus da 'n em nac'h e-unan ha da chom bepred stag ouzoc'h, er glac'har vel el levez, roet d'imp dre e skoazel, ni ho ped, er c'hras da heuilh ken mat e skoueriou dispar, ma hallfomp kat, eun de, an hevelep kurunen gantan. »



SANT-BRIEG

Ti-Mouleréz Sant-Gwilherm, 27, Bali Charner

